

Dastumadenn

Skridoù rakwalarnek

PROSPER PROUX

OBEROÙ KLOK

*Adembannadur skoueriekaet ha kentskrid
gant Goulven PENNAOD*

PREDER

Kaier 187-188

Genver-C'hwevrer 1975

Dastumadenn

Skridoù rakwalarnek

PROSPER PROUX

OBEROÙ KLOK

*Adembannadur skoueriekaet ha kentskrid
gant Goulven PENNAOD*

PREDER

Kaier 187-188

Genver-C'hwevrer 1975

Diwar vremañ e vodimp en *Dastumadenn*
Skridoù rakwalarnek embannadurioù pe adembannad-
urioù eus al lennegezh vrezhonek savet a-raok pe
e-maez luskad *Gwalarn*.

Evitañ da vezañ ar c'haier kentañ o
tont dindan an ustitl Skridoù rakwalarnek, ez eo
al levrenn-mañ an trede skrid eus an dastumadenn,
an daou gentañ o vezañ :

Yann-Vari JOUBIOUZ, *Doue ha mañ bro (1844)*, adembannadur
skoueriekaet ha notennoù gant Goulven PENNAOD, LAVAR 06,
Preder, 170-171, 1973 (15 F).

J.-M. HENEU, *Bourraplled an tiegezh (1932)*, adembannadur
skoueriekaet ha notennoù gant Goulven PENNAOD, *Preder*,
179-180, 1974 (15 F).

PREDER, 10, rue I. Louveau, 35000 RENNES
C.C.P. 16 093 13 PARIS

G O U L V E N P E N N A O D

K E N T S K R I D

Techet eo an dud da grediñ ne voe skrivet hogozik tra en hon yezh a-raok *Gwalarn*. Padal, pa daoler ur sell ouzh an dorn-levroù war istor hon lennegezh savet gant Abeozen pe Loeiz Herrieu, ken puilh eo an anvoù meneget ma teuer da grediñ emeur dirak katalog *Manufrance* brudet !

Eno e paouez hon joa avat, rak disasunoc'h danvez n'oufed kavout eget gant al "lennegezh"-se. Enoüset un torr-penn bout rediet da lenn oberennoù hon "barzhed vrudet" hag an "instruksionoù a skouer vat" a c'hourfaotereka enno ! Dre chañs ez eus bet a-hed ar c'hantvedoù "farserien" ha "konterien kaozioù" a zo deuet betek ennomp ul lod eus o oberennoù, Claude-Marie LE LAË (1745-1791) a zo e *Sarmon war ar maro a Vikael Vorin* ur misi e lenn, da skouer. Dibaot int, rak brizhelevez an dudjentil o miras a embann hevelep pezhioù.

E-touez hon skrivagnerion eus an 19^t kantved a c'hellomp c'hoazh lenn gant dudi e ranker kontañ Prosper PROUX "a ziskouez bezañ bet, eme Taldir, ur spered digabestr, ar pezh na oa ket un dellid bihan, en amzer-se, hag er c'hontre a veve. N'eo ket chalet gant ar pezh a vo lavaret diwar e benn. Heuilh a ra e soñj, kanañ 'ra ar pezh a blij dezhañ, hep pleal ouzh ar goñv-enañsoù degemeret (PRPR 117).

* * *

Ganet e oa bet e Poulaouen d'an 20 a viz Here 1811 ha mervel a eure e Montroulez d'an 11 a viz Mae 1875.

E dad, a oa 32 vloaz e 1811, oa kefier e kevredad mengleuzioù Poulaouen, hag e vamm, Marie-Reine-Mathurine-Josèphe Du Parc de Kerret, 19 vloaz neuze, oa bet ganet e Gwerliskin. Deuet mat oa e dud e-touez tudjentil Poulaouen, pa voe anvet Simon-Gérard Proux da vaer ar bourk gant Napoleon Gozh. Ne badas ket avat, rak mervel a reas e 1818, o lezel gant e wreg tri bugel : hon barzh, Prosper - François - Marie, ha div blac'h, Marie-Caroline-Clotilde (1813) ha Marie-Palmyre-Benjamin (1815). Distreiñ a reas an intañvez davet he mamm, an Itron Du Parc, e Gwerliskin hag addimeziñ e 1820. Mervel a reas, hep bugel nevez, e 1823 hag he fried a guitaas ar vro o lezel e lezvugale gant ar vamm-gozh.

Homañ a gasas Prosper da skolaj Kastell-Paol ha, da c'houde,

da lise an Oriant, mes tremen a rae e vakañsoù e Gwerliskin, "hag eno, asambles gant bugale all ar gêr vihan, e peurzeske ar brezhoneg, bet klevet gantañ da gentañ e-touez mengleuzierien Poulouen. Imposubl e vije bet dezhañ, en pep doare, chom hep diskiñ brezhoneg yac'h en Gwerliskin" (PRPR 17).

Goùde bout graet e goñje e kadred goafourion Versailles, ha bout bet disluet abred dre m'en doa torrete c'har, e soñjas Proux e oa poent mont war ur vicher bennak : dont a reas da implijad mererezh an tailhoù e Gwerliskin da gentañ hag e Lokronan-Leon. Rein a reas e zilez e 1863 ha dont en-dro da Werliskin, evit nebeut amzer, rediet ma voe da zont da gannad kenwerzh e Montroulez evit gounit e vuhez. Eno e varvas.

* * *

Div levrig barzhoniezh a embannas, an eil 'Ganaouennou graet gant eur C'hernewod' e 1838, egile 'Bombard Kerne, Jabadao ha Kantri' e 1866. En tu all da se e savas meur a ganaouenn pe a bezh barzhoniezh, ul lod mat anezhe, hep mar, kollet da vat. Kement zo deuet betek ennomp vo kavet amañ da heul, hervez an embannadur savet gant Taldir en e dezenn "pour l'obtention du grade de Docteur de l'Université de Rennes", gant an anv : PROSPER PROUX / (1811-1873) / STUDIADEN / var / E VUEZ, E LIZEROU, E VARZONIEZ / Staget outhi eur Voulladen nevez / EUZ / E HOLL OBEROU / Embannet ha Diembann / GANT / F. JAFFRENNOU (Taldir) / Hag ur Patrom eus Proux skeudennet gant Jac. FOHIER / KERAEZ / Moullevez "An Bobl" / - 1915 -, berraet PRPR amañ a-zloc'h.

Evit komz strizh, ar ger "holl oberoù" n'eo ket peurwir, dre ma vank Margodig Koant, nemet ar peder gwerzenn gentañ anezhi; un notenn (PRPR 192) a lavar : "Eur feillennik, skritur Proux, pap. Ar Braz. Diembannabl". Miret eo bet deomp avat dre hantererezh un adskrid diwar dorn Youenn DREZEN; n'omp ket evit gouzout penaos e oa deuet hemañ da gaout ar pezh "milliget"-se; marteze a-walc'h digant Taldir e-unan a ouie, en e vuhez prevez, bout ur paotr gailhard ha pailhard a-walc'h evel m'en diskouezo lodenn ziembann (ha barnet "diembannabl") e envorenoù... Anavezet eo dija Margodig koant gant un nebeut re peogwir en he likis moulañ e-barzh *Kannadig Kêrvrezh* un nebeut bloavezhioù zo.

N'omp ket e soñj sevel amañ ur studiaden lennegel diwar-benn "barzhoniezh" Proux. Da varno al lenner e-un. D'hon soñj, plijus-kenan ha bev ur souezh kanaouennoù e zastumadenn gentañ, damzivlaz re *Bombard Kernev*, ha peuzdidalvoud al litoriennou diwar La Fontaine a stagas oute... Spazhet eo bet ar barzh, ken diwar guzulioù e vignoned evel Luzel, ken diwar ar vrud fall lakaet war e anv gant beleion e vro.

Ar varnadenn wellañ diwar-benn e oberenn a chom hini Abeozen (ILV 23) pa skriv : "Bez' a zo (d'e oberoù) un dro spered poblel-rik. Fentus int peurvuiañ hag alies en un doare reut a-walc'h. Graet int da blijout d'ar re a vag donjer d'ur Vreizh klemmvanus, poblel-dreist hi ivez koulskoude mar sellomp ouzh ar gwerzioù dastumer gant An Uhel. Ret eo anzav, avat, mard eo farsus-kenañ rimadelloù Prosper Proux, ne gaver ket enno nemeur a dra da wintan spered al lenner a-us d'ar vuhez pemdez-iek. Pezhioù fromus ha dic'hoarzh, evel Kimiad ur Soudard Yaouank,

a zo bihan o niver e-mesk e oberoù. Plijet eo bet a dra sur Prosper Proux o sevel e werzennoù ha peadra da c'hoarzhin en deus prientet evit plij d'e lennerion pe gentoc'h d'e selaouerion, rak kanaouennoù en deus savet dreist-holl, a-wechoù war donioù gallek, hag ouzhpenn an ton a zeu moarvat diouzh an tu-se meur a wech. C'hwek ha bev eo brezhoneg Prosper Proux, puilh ennañ an troioù-lavar livus. N'hellfed reiñ nemet meul-eudi da Prosper Proux war an dachenn-mañ, ma n'en dije ket, en ur blegañ re strizh da zoare boutin ar varzhed pobl, brizhellet e yezh ken yac'h ha ken bev gant gerioù gallek n'oa peurvuiañ tamm ezhomm ebet anezho".

* * *

Da gentañ penn hor boa soñjet advoulañ oberoù Proux dres evel ma voent embannet gentañ, eleze evel m'o c'haver e levr Taldir. Hogen, diwar sellet pizh e verzer n'eus nemet e ganaouennoù kentañ a c'hell bout degemeret evel peurfeal d'e soñjoù war gudennou ar skritur ha dibab ar stummoù. E *Bombard Kernev*, n'eus mar ebet e voe adwelet ha "reizhet" e skrid gant Luzel. Ouzhpenn se, ar pezh a dalvez evit al lenner a vremañ zo adkavout an danvez hag ar furmoù, neket an eilstummoù, ha setu perak hon eus skoueriekaet pep tra, o viret avat kement a c'halle diskouez anat doareoù ar yezh a implije. Ra genverio al lenner amañ da heul ar pezh anvet Ar paour kazh Lazar, bet moulet da gentañ e-barzh *Ganaouennoù* (1838) ha, da c'houde, bet moulet da gentañ (1866), evel m'en kaver en div zastumadenn-se, gant hon skrid. A-walc'h vo, a gredomp, evit diskouez an hentennou hon eus heuliet, hag ivez an treuzfurmadoù degaset gant an aozer pe gant e vignoned en e oberoù.

(Embannadur 1838)

Ar paour quès Lazar,
gret gant eun den hanter varo.
Var an ton gallec : Trou là, là, là.

1
Var ma fé camaradet
Terrupl e c'hon bet stropet,
Credi a ren en tol-ma
E rancqchen lipat ma loa.
Trou là là... trou là là...

2
An ancqo, louzen ep fri,
Vit tach dam stleja ganthi
En bro teval ar gohet
Terrub he deus c'hoariet.

3
Na velquent, deus he c'hriffio
Meus chasset va relego;
Mæs pel a vo ingravet
Var ma bisach he c'hachet.

(Embannadur 1866)

Ar Paour keaz Lazar,
Gread gan eunn den nevez-zistro oud
ar Bed-all. War don : Maoud ar Goff
ha maoud ar Gall.

(1)
War ma fe ! ma mignounet,
Divalo on bet gwasket.
Sonjal a rean, e taol ma,
E renkchenn lipad ma loa.
DISKAN
Tra, la, tra, la, tra, la, la !
(2) (bis)

5 Ann ankou, ann dougnez kri,
Evit ma stleja gant-hi,
E bro teval ar goet,
Kalz, kalz he deuz c'hoariet.
Diskan, Tra, la...

(3)
Na velkent, ouzh he skilfou,
M'euз chaset ma relego;
Med, pell, a vo kizellet
War-n-oun he fao milliget.
Tra, la...

4
13 Ma diou chot a zo melen
Evel eur gos anduillen,
Ma lagat anter varo
Treat on vel ur c'hant tacho.

5
17 Ma choucq a zo daoubleget,
Ma fri neus eun troatad hed,
Teuet moust eo ma c'hof car
Bransiguellat ra ma diou c'har.

6
21 En guis deur c'hos pautr seyet
Var eun tamic baz harpet,
Er parcou en em stlejan
Vel ar c'hicher da heolian.

7
25 Red eo bet din crenn cuitaat
Quement sort a gaven mad,
Ar pezh so goassoc'h ouспен,
Carout pezh a gasqaën.

8
29 A viscoaz e meus caret
Starda costou ar merc'het,
Nemert ma flünzec brema
Na meus quen hurz da starda.

9
33 Guech all eur banac'h guin mad
A zederre ma lggad
Brema zan pa me zec'het
Da drinqua gant ar pesquet.

10
37 Carout a ren ar bevin,
Al loue, ar maout, ar poncin,
Mæs brema vel eur paour quæs
Ne zebzan mert yod a lès.

11
41 Moguet va c'horn a lamme
An oll sourci diganne;
Mæs adieu ma yalc'h bordet,
Ma c'horn quer brao culotet.

12
45 Bars em c'halon a garien
Mont d'ober eun aubaden,
Mæs ar vech-ma hep soner
E meus bet grèt eun danç caër.

13
49 Plijout a rae din redec
Daoulampat gant ma c'hazec,
Brema vel eur velveden
E chouçsan bars va c'hroguen.

(4)
13 Ma diou jod a zo melen
Evel ur c'hoz anduillen,
Ma lagad hanter varo,
Tread oun vel eur zac'h tacho.
Tra, la...

(5)
17 Ma chouk a zo daoubleged,
Ma fri n'euz eunn troatad hed,
Teuzet krag eo ma c'hof kar,
Ha krena ra ma diou c'har.
Tra, la...

(6)
21 Evel ur paour mac'hagnet,
War eunn tammik baz harpet
Er parkou, en em stlejan
Vel ar c'hisier da heolian.
Tra, la...

(7)
25 Red ec'h eo din, krenn, kuitaad
Kement seurt a gavenn mad,
Hag eunn dra vrasoc'h, - ouc'h-penn,
Karoud pezh a gasaenn.
Tra, la...

(8)
29 Karoud a rean ar bevin,
Eunn tamm maout, eur c'har bonsin,
Breman renkann, vel eur c'hez,
Lonka iod ha patatez.
Tra, la...

(9)
33 Gand eur banac'hik gwin mad
E verve, gwech-all, ma gwad,
Breman z'ann, p'am euz sec'het,
Da eva gant ar pesket.
Tra, la...

(10)
37 Ma c'hourn, gant he vogeden
Am lake zard ha laouen,
Keno, ma ialc'h varelliet,
Ma c'hourn ker brao brageset !
Tra, la...

(11)
41 A greiz kaloun e karien
Ar biniou, ann abaden,
Med ar wech man, heb bombard,
Em euz renket lammout stard !
Tra, la...

(12)
45 Me gare, d'ann daou lamm ru,
Nijal gant ma c'hazec du;
Breman, vel eur velc'houeden,
E kuzan barz ma c'hrogen.
Tra, la...

14
Carout a ren mintin mad
Er mene redec ar c'had
Brema ne ran quen chaçse
Mert d'ar c'hoënn deus va guele.

15
Erfin ma meus em amzer
Gret avechou tolio caër
Me a gao d'in o fëan
Queric avoalc'h ar vech man.

16
Mamou ta ma fardonnet
Ma meus bet guech all lèret
Do merc'het coant fors pocqo,
Pa vin yac'h me o rento.

13
Karoud a rean, mintin mad,
Er mezou, redg ar c'had,
Breman ne rann ken chase
Nemed da c'hoen ma guele !
Tra, la...

DA ERVOAN-M. ANN ANDOUAR
E GWERLISKIN

T A O L E N N

I. KANAOUENNOÙ GRAET GANT UR C'HERNEVAD

Taldir, p.

1. Ar merc'hetaer.....	2	135
2. Gwerz war marv an targazh "Grigri" ...	4	137
3. Ar paour kaezh Lazar	6	140
4. An amzer gwechall hag an amzer breman.	8	143
5. Gwilhamed ar gouilhourenn.....	10	145
6. An Dogan	12	147
7. Meurlarjez	14	150
8. Kimiad ur soudard yaouank.....	16	151
9. Keleennadurezh da'r merc'had.....	18	154
10. An den sammet ponner.....	19	154
11. Diviz entre ur c'hliant yaouank hag ur risklerez kozh	21	157
12. Kazh Pipi.....	22	159
13. Pipi an diwezad.....	24	161
14. Ar vuoc'h laer	26	163
15. Kofesion ur paotr dilikat.....	27	164
16. Yam-Pipi, e vestrez, hag al laeron...	30	168

II. OBEROÙ DISTAG PE DIEMBANN (1858-1866)

17. Ar pemoc'h.....	34	173
18. Alanig al Louarn.....	36	174
19. Ar mezhvier.....	38	176
20. Tadig-kozh ar brabañser.....	39	177
21. Ar c'hi dilostet.....	40	179
22. Pesk ebrel.....	43	182
23. Ar botoù-koad.....	44	183
24. Kilhog ar barrez.....	45	184
25. Louizaig ar Rouz.....	46	185
26. Ar wreg a foet he gwaz.....	48	187
27. Doareoù Tregeriz.....	50	190
28. Margodig koant	53	(192)
29. Testamant ar mezhvier.....	55	192
30. Mari Beg a-raok.....	56	193

III. BOMBARD KERNEV

KENTAN LODENN

31. Un tammig kaozeadenn.....	60	200
32. Ma vijen barzh.....	62	201
33. Chapel sant Erwan.....	65	204

34. Kimiad ur soudard yaouank.....	66	206
35. Distro ar soudard e Breizh.....	68	208
36. Mouezh ar c'hleier.....	70	211
37. An hent-houarn.....	72	213
38. Ar <u>Fubuenn</u>	74	215
39. Ar soudard fougeer.....	76	217
40. Hirvoudoù ar chaseer.....	78	220
41. Ar paour kaezh Lazar.....	79	221
EIL LODENN		
42. Al louarn besk.....	81	223
43. Perrinaighag he fodad laezh.....	83	224
44. Ar bleiz hag an oan.....	85	226
45. An den hanteroad hag e ziv vestrez.....	87	228
46. Ranz kêr ha ranz kouer.....	89	229
47. Margod ar big.....	91	231
48. An daou glasker-bara hag ar graoñenn.....	93	233
49. Ar wrac'h kozh hag an div vatezh.....	95	235
50. Ar miliner, e vab hag an azen.....	97	236
51. An daou vignon.....	99	238
52. Ar c'hog-raden hag ar verienenn.....	101	240
53. Da ziwezhañ.....	103	241
IV. OBEROÙ GOUDE 1866		
54. Diougen	106	245
55. Da'm mignon kozh I.P.M. ar Skour.....	106	245
56. Brezel ar Prus.....	107	246
57. Da varzhed Cymru.....	108	247

I
K A N A O U E N N O Û
g r a e t
g a n t u r C' h e r n e v a d

Faotred ha mero'hed yaouank, kanit, kanit brema,
Rak prest ar gozhni skornet a ray d'ho mouezh krenañ,
Ho lagad ker birvidik a deñvalay souden :
Hunvre kaer ar yaouankiz vel ur skeud a dremañ.

I....

Graet gant un den eus ar vicher.

War ton : Febezh keloù, o va Doue.

1. Abace an devezh milliget ma chañsas d'hor mamm gentañ
Kaout ur c'hoantedenn avaloù, n'eus met poanioù er bed-ma,
Martolod, eskob, devezhour, pep hini 'n deus e viser,
Mes n'eus ket krisoc'h planedenn vit hini ur merc'hetaer.
- 5 2. Mil drubuilh, mil displijadur a renk bezdez anduriñ,
Ne hall ket paouez un istant, atav en deveus soursi;
Evel ur c'had er radeneg, ne gousk morse met hanter,
Pa vez aet an holl d'o gwele e red c'hoazh ar merc'hetaer.
- 10 3. Gwell ez eo bezañ dastumet, chadenmet evel ur c'hi,
Lakaet da zivall ar gwagez en rouantelezh Turki,
Bezañ broudet vel un azen, sammet vel ur marc'h glaouer,
Argaset evel ar bleizi, eget bezañ merc'hetaer.
- 15 4. Na n'eus nag enor na profit da c'hounit e-barzh ar stad,
Koulskoude a-benn e ober eo ret bezañ dilikat,
Kavet un teod deliberet, ul lagad lemm ha seder,
Pasianted ur gevndenn evit bezañ merc'hetaer.
- 20 5. Ret eo bezañ vel un targazh, gwelet en deñvalijenn,
Bezañ santel vel ul louarn, meur evel ur silienn,
Kalonek evel ul leon, krapat en-giz d'ur gwifiver,
Bezañ skañv evel ur c'haro vit bezañ gwir merc'hetaer.
- 25 6. Bezañ gadal ha servijus, cherisañ ar vugale,
Lâret ez int patrom o zad evit plijout da'r gwagez,
Goût tremen brav deus an dud kozh, selaou mat o zaolioù kaer
Paeañ dê bannec'hoù lapach vit bezañ gwir merc'hetaer.
- 30 7. Kaout divskouarn deus ar skiltrañ, tevel pezh en deus klevet,
Diwall mat da'n em vrabañsal eus madelezh ar merc'hed,
Goût an tu da livañ gevier, nac'h a-wechoù pezh zo sklaer,
Touet e vez noz da greistez, vit bezañ gwir merc'hetaer.
8. Klevet preposioù dipitus, bezañ bountet en kaozioù,
Insultet gant kozh rampenned, reiñ ha resev bazhadoù,
Anduriñ meurbet alies ar glav, an ero'h, an tommer,
Faeltrañ e gorf hag e zilhad : start eo bezañ merc'hetaer.

9. Miret un nor da wigourat, miret ur c'hi da harsal,
 35 Mont en tier dre ar prenestr, memes dre ar sininal,
 Krapat dimeus ar mogerioù, goût lammat dreist ar girzhier,
 Pale sioul evel al logod vit bezañ gwir merc'hetaer.
10. Mestroniañ e santimant, dero'hel kloz war e soñjoù,
 40 C'hoarzhin gant kañv en e galon, skuilhañ pezh a gar daerou,
 Kemer hervez m'eo ret dezhañ ur stumm souret pe seder,
 En em divoazañ da rusiañ vit bezañ gwir merc'hetaer.
11. Mes ar startañ deus ar vicher es eo gounit ar merc'hed,
 45 Kizidikoc'h marc'hadourezh nend eus ket war boull ar bed,
 Deus he divis, he santimant, e hini a renk ober,
 Lemm memes barzh en he soñjoù, vit bezañ gwir merc'hetaer.
12. Vit dont a-benn deus ur seurez eo ret ober ar glufenn,
 50 Evit gounit un everez, soubilhañ he c'horzailhenn,
 Da'r merc'hed a gar 'n em bentañ, reiñ ur c'hoef, un davanjer,
 Lâret amploc'h evit justoc'h vit bezañ gwir merc'hetaer.
13. Goude lakeat e holl galloud, foetañ e liardigoù,
 55 Kavet fourgas ha nec'hamant, kaboullhat dre ar poullou,
 E vank alies e daolioù, e teu divragoù da'r gêr,
 Pinous vel ur c'hog dibluñvet : start eo bezañ merc'hetaer.
14. Euzhiñ a ran pa gomprenan pegement a drubuilhoù
 55 A vizer hag a boan spered a soufr ar paour kaezh Pitou.
 Mes ar merc'hed zo ken tentus ha va c'halon ken tener
 Ma'z on en desped da'm baro kontren da heul ar vicher.

2

GWERZ WAR MARV
 AN TARGAZH "GRIGRI"
 graet gant e intañvez Minetig

War ton : Margodig.

1. Me ho ped dedostait holl gizhier ar vro-man,
 Deut da gemesk ho taerou gant ar re a skuilhañ;
 Nos deiz va mouezh hirvoudus a son er sanellou,
 Grigri ma muiañ karet, Grigri a zo maro.
- 5 2. O ya, dec'h, dec'h diwezhañ, an ankoù diremed,
 Fini, siwazh, na espern na kizhier na razhed,
 Hep truez d'e oad tener, en tarz deus e vuhez,
 En deus skoet anezhañ gant e falc'h didruzez.
- 10 3. Kanit brema Te Deum, gozed, logod, razhed,
 Deus hoc'h adversour brasañ setu c'hwi delivret,
 Debret, krignet, breskennet, lezet ar soursioù,
 Grigri, an targazh terrupl, Grigri a zo maro.
4. Grigri a oa ar roue deus an holl targazhien,
 Ne gavjed ket par dezhañ vit krapat en ur wênn,
 Evit pourmen gant herrder war un doenn ramplus,
 Ha foeltrañ war o genoù gant ar chas hegasus.
- 15 5. E groc'hen a oa flouroc'h eget ur voulouzeenn,
 E zoulagad lugernus evel div steredenn,
 E zent hag e ivinoù gwenn-sign, lemm ha poli,
 E voustachoù grasius, siket endan e fri.
- 20 6. Ker tanav, ker bihanik a oa e zivskouarn,
 E lost a raje avi d'Alanig al Louarn,
 E gorf a oa dilikat, e droad moan ha lijer,
 E vouezh, skiltr vel un drompilh, oa karget a zouster.
- 25 7. En ti ne oa ket unan na gare anezhañ,
 Bepred ar gwellañ tannoù vije miret dezhañ,
 Eurus e oa ma karje, mes ur c'hazh displeal
 Zo bet kiriek d'e varo dre e alioù fall.
- 30 8. Da heul e vignon treitour, dievesh eo skampet,
 Vit redek an toennoù war-lerc'h ar gazhezad,
 Eizh deiz diouzhtu e renas hep return war hon zro
 Ur vuhez meurbet mezhus 'mesk pep sort dizurzhoù.

- 35 9. Erfin, dec'h er c'halatres, mantret gant an anken,
E welis dre al lukarn Grigri kaezh éc'h antren,
Distruj, kastiz, diflaket, foulet, en em drenañ,
E lagad hanter varo hag e lost o stlejañ.
- 40 10. Erru en-tal va c'hichen voe ret dezhañ gourvez,
Ha gant ur vouezh truezus e lavaras neuze :
Dimeus va holl dibolloù setu me puniset,
Ar maro gant ar poeson a red em gwazhied.
- 45 11. Oc'h echuiñ ar gomz-ma, e benn mouk a gouezhas,
E saoulagad un istant estrañch a lugernas,
Heñvel deus ur c'houlouenn é vont da soetiñ;
Pa esaeis en sikour, ar paour kaezh ne oa mui.
12. Breman vel un durzhunell p'he deus kollet he far
Ne rin nemet hirvoudiñ da'n heklev va glac'har,
Va bugaligoù tener, ker yaouank minoret,
A di da di a yelo da glask o zammig boued.

2a

STUMM DISHENVEL

diwar un dornskrid savet gant Prosper,
mab henañ ar barzh, etre daouarn an
Ao. Proux, Kemper.

- 5 1. Me ho ped, didostait holl gizhier Montroulez,
Deut da gemmesk ho taeroù gant re an intañvez,
An intañvez glac'haret gant un anken garo :
Grigri ma muiñ karet, Grigri a zo maro.
- 5 2. Digwener deus ar mintin, an ankoù drouklivet,
Fini, siwazh, na espern na kizhier na razhed,
Hep truez d'e yaouankiz, hep truez da'm glac'har,
En deus skoet anezhañ gant e falc'h dihegar.
- 10 3. Dimeus va holl dizurzhoù me a zo kastizet,
Lonket em eus al louzoù prientet da'r razhed.
4. O peurlâret ar gomz-se e benn mouk a gouezhas
E saoulagad difluket, euzhus a lugernas,
Vel ur c'houlouenn rousin darev da echuiñ,
Intañvez e oan siwazh, ar paour kaezh ne oa mui.

3

AR PAOUR KAEZH LAZAR (*)

graet gant un den hanter varv

War an ton gallek : Trou la, la, la.

1. War ma feis, kamaladed,
Terrupl ez on bet stropet,
Krediñ a raen en taol-ma
E rankjen lipat ma loa.
Trou la la ... trou la la ...
- 5 2. An ankoù, louzenn hep fri,
Vit tach da'm stlejañ ganti,
En bro teñval ar gozed
Terrupl he deus c'hoarriet.
- 10 3. Na velkent, deus e c'hrifoù
'M eus sachet va relegoù;
Mes pell a vo engravet
War ma bizaj e c'hached.
4. Ma divjod a zo melen
Evel ur gozh anduilhem,
Ma lagad hanter varo,
Treur on vel ur c'hant tachoù.
- 15 5. Ma choug a zo daoubleget,
Ma fri 'n deus un troatad hed,
Teuzet mouest eo ma c'hof-gar,
Brañsigellat ra m' divhar.
- 20 6. En-giz d'ur c'hozh paotr seizet,
War un tammig bazh harpet,
Er parkoù en em stlejan
Vel ar c'hizhier da heoliañ.
- 25 7. Ret eo bet din krenn kuitaat
Kement sort a gaven mat,
Ar pezh zo gwashoc'h ouzhpenn,
Karout pezh a gasaen.
- 30 8. A-viskoazh em eus karet
Stardañ kostoù ar merc'hed,
Nemet ma flufveg brema
Ne'm eus ken urzh da stardañ.

(*) Sl. p. 79.

9. Gwechall ur banneo'h gwin mat
A sedere ma lagad,
Brema 's an pa'm bez sec'hed
Da drinkañ gant ar peked.
10. Karout a raen ar bevin,
Al leue, ar maout, ar poñsin,
Mes brema vel ur paour kaezh
Ne zebzan met yod ha laesh.
11. Moged va c'horn a lame
An holl soursi diganen;
Mes adieu ma yalc'h bordet,
Ma c'horn ker brav kulotet.
12. Barzh em c'halon a garien
Mont d'ober un abadenn,
Mes ar wech-ma hep soner
Em eus bet graet un dañs kaer.
13. Elijout a rae din redek
Daoulammat gant ma c'hazeg,
Brema vel ur velc'huedenn
E souchan barzh va c'hrogen.
14. Karout a raen mintin mat
Er menez redek ar c'had,
Brema ne ran ken chase
Met da'r c'hwen deus va gwele.
15. Erfin, ma 'm eus em amzer
Graet a-wechoù taolioù kaer,
Me a gav din o faean
Kerik a-walc'h ar wech-man.
16. Mannoù 'ta, ma fardonet,
Ma 'm eus gwechall laeret
D'ho merc'hed koant forzh pokoù,
Pa vin yac'h me o rento.

4 AN AMZER GWECHALL HAG AN
AMZER BREMAN

War ton : Grigri.

1. Ar bed holl, eme Yann gozh, a gemer ur stumm fall
N'eus chomet war an douar mann vel ma oa gwechall !
Paour kaezh Yann, c'hwi zo cheñchet dre m'oc'h deut da c'hriazañ,
Mes ar bed a zo chomet memes tra, memes tra.
2. Goude al loar, ar stered hag an deñvalijenn,
Gant an heol bep mintin e par ar sklerijenn,
Barzh an oabl an alc'houeder a sav en ur ganañ,
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
3. Gant e chupenn erc'h skornet pa deu ar goañv kriz
Da c'hourdañ hon bizied ha da ruziañ hor fri,
An eil dimeus egile daou bried a dosta
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
4. P'erru an nevez-amzer da c'haeaat ar parkoù,
Da lakaat bleuñv er balan, delioù barzh ar c'hoadoù,
Lagad ar merc'hed yaouank ivez a sedera
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
5. Ar vugale zo brema begek, vif ha seder,
War meur a dra int savant a-raok goût o fater,
An avaloù afuret a blij d'e ar muiañ
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
6. Em desped da'r veleien, da'n diaoul ha d'e gernioù,
An dud yaouank zo troet terrupl gant an dañsoù,
Gwell a ve gante tremen hep dibriñ hag evañ
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
7. Meur a seurez vez lakaet da zougen ar Werc'hez
He deus gwelet an delioù a-enep alies;
Se ne vir ket diouti modest bras da ruziañ
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
8. An diaoul a gollas Eva bepred a zo tentus,
Ar merc'hed koant zo ivez atav brek ha sentus,
Dimeus ar frouezh difennet kalz siwazh a glañva
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.

9. Bezañ zo en holl kêrioù kalz a gozh rampenned
O deus roet da Zoue pezh a zisplij da'r bed,
35 Noz deiz o zeed milliget a ifam o nesañ
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
10. Paotred a weler bemdeiz o oapaat ar marc'hed,
Merc'hed a weler ivez o kaketal paotred,
40 Toust kalz, dero'hel nebeut, a zo ar giz brema,
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
11. Meur a osti hep burzhud a cheñch an dour en gwin,
Meur a blac'h a lak pilhoù da rontaat he feultrin,
Brozhioù d'ober un talier, an holl a glask tromplañ,
45 Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
12. Ar Pitou kaezh zo barnet bepred da souffr poanioù
Gant ar Wawaon vez flemmet, brevet a vashadoù,
Mar chañs dezhañ dimiziñ, eo dogan peurvuiañ
50 Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
13. Meur a zogan a ra goap deus penn e amezeg
Ha ne oar ket alies eo c'hoazh muioc'h kornek,
Darn all n'int ket er vreuriezh hag a garfe bezañ,
55 Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.
14. Sepet ar bragoù toull gwiz, al loeroù marellet,
Ar jiletenn kof yodek, ar berukenn poultrèt,
Ar peurrest a zo chomet e-barzh ar stad ma oa,
Vel en amzer tremenet, memes tra, memes tra.

War ton son an dañsoù : Tostait ama tud a skiant.

1. Nend eus ket pell barzh em c'halon en doa c'hwezhet Lusifer
Ur c'hoant bras da zastum madoù, mes penaos en em gemer ?
Goude bezañ soñjet ervat e teuis da gonkluiñ
Ne'm boa ket ur voean verroc'h eget tach da zimizif
5 Da Wilhamed ar Gouilhorenn, deus komanant Rest ar C'hi.
2. Vit kavet ur sort soñjezon, oa ret bezañ trelatet,
Rak n'eus ket barzh en Breizh-Izel ur spontailh vel Gwilhamed,
He fri kamm karget a vutun a zo vel beg ur gaoenn,
He divjod treut ha kreienet en liv ur gozh gwadegenn,
10 He groñj en furn d'ur vazh-dotu d'he fri a boko souden.
3. He daoulagad ruz ha skoelfet a zo pikouzet noz deiz,
Pa vez troet un da Wengamp, war-zu Brest vez egile,
En-giz d'ur form eo he genoù, he dent vel ur gozh rastell,
Hañval deus bordoù ur pod-kambur eo he div foeltrenn muzell,
15 He mouezh dous ha melodius evel hini ur porc'hell.
4. He blev reut vel reun ar gwizi zo en liv da'r c'harotez,
He divskouarn plat ha ledan evel kregen-sant-Jakez;
He goùg c'hwezhet ha kramennek en he divskoaz zo kollet,
He choug vel hini ur c'hañval gant ur pezh tort zo sammet,
20 Vel ur sac'h stripoù pa vale e fistoul kig he bruched.
5. En-giz da sol ur gozh vomez ez eo kompez he zalier,
Hec'h ivinoù a zo hañval deus a c'hrifoù Lusifer;
Unan ivez deus he divvrec'h vel ur c'hevre zo gweet,
He divhar en furn treid bankoù a gaoc'h saout zo marellet,
25 He greid evel re an houidi en diabarzh zo treujet.
6. Pa 'n em desidis, ur sulvezh, barzh en he zi da antren,
En he c'havis divouchouer, diskabell ha diarc'hen,
O kravet ur wiz hudur, moc'h munut en-dro dezhi,
Unan memes war he barlenn, sioul bras é voredif,
30 Hag an hoc'h kozh é kabouilhac er chaodouren gant e fri.
7. Savet ez eo bet ma c'halon o wetet ur sort marc'hken,
A nebeut a zo defactet war va giz na zistrojen,
Mes ar soñj dimeus he yalc'had en deveus ma c'hourajet,
Va sok barzh em dorn umblamant diouti ez on tostaet,
35 Hag en ur feson respedus em eus hi bet saludet.

8. Ar plac'hig ne oa ket, siwazh, imoret kaer an deiz-se,
Gant min un targazh fourgaset he deus goullet diganen :
Petra zo evit ho servij, pesort aman a glesket ?
Deut on, emôn-me, plac'h yaouank, en ho ti vit ho kwelet,
40 Hag en esper da gouñversañ ganec'h-hu, mar asantet.
9. Neuze, gant ur fas konnaret ez eo savet ar furi
En ur danfoeltrañ he forc'hell e-barzh en kreis al leur-zi;
An diaoul, emêi, gant ho koñvers, ganec'h hag an holl paotred,
N'eo ket ar plac'h a blij dec'h-hu, an aro'hant eo a c'hoantaet;
45 Diwar ma aro gant an tanfoeltr, istrogell, prim diskampet.
10. O welt ur pezh ken divergont, n'on ket, mar keret krediñ,
Chomet dirak ar gouilhorenn un eur da c'henaouegiñ;
Da'r gêr on skampet, dic'houstet dimeus ar briedelezh,
Yac'haet mat deus ar c'hoantegezh da gaout yalc'h ar bemhêrez,
50 Rezolvet kentoc'h da zebriñ pad ma buhez patatez.

6

A N D O G A N

War ton : Ar plac'h-ma savas da'r gwener.
Pe war ton : Merc'hed Karrahez a lamm en aer.

1. Egen diot eo ar wazed
Pere zo noz deiz trubuilhet
Oc'h eveshaat o friedoù
Gant son da zougen ar c'hernioù,
Rak eurusañ den a vale
5 Ez eo un dogan, war ma feiz.
2. Ur wreg fidel zo peurvuiañ
O skandalat pe o vouzhañ,
Ec'h heskinat he c'hi, he c'hazh,
He matezh, peotramant he gwaz.
10 Ya, eurusañ den a vale
Ez eo un dogan, war ma feiz.
3. Kontrol dezhi, gwreg un dogan
A zo dinoaz evel un oan;
Graio he gwaz vel ma karo,
15 Biken komz rebech ne glevo.
Ya, eurusañ den, &a.
4. An holl a zo dezhañ mignon,
Ar maer, ar sakrist, ar person.
Bennec'hoù pezh a gar lonkañ
20 Hep ma renk james o faeañ.
5. Da ouel Mikael, mar n'hall paeañ,
N'en deus ket d'en em ankeniañ;
Termen en do pezh a garo
Fa yel Fant da gaout an aotrou.
- 25 6. Fa vez tomm ha brav an amzer
Ne vezo ket dalc'het er gêr;
Gant e wreg e vo aliet
Da bourmen evit e yec'hed.
7. Gant n'erruo ket re abred
30 Laouen e vo degemeret,
E goan prientet a gavo
Hag e wele tomm, a-wechoù.

8. Mar c'hañs d'e itron gwilioudiñ
 En em ginnig ar gompiri,
 35 Hag an holl a gav ar bugel
 Deus e dad pimpatrom hañvel.

9. Bigale en deus a bep sort :
 Hag a re eeun hag a re dort,
 Re vrun, re du, hep kaout ar boan
 40 Da ober anê e-hunan.

10. Holl dud e di hag e bried,
 Mar keret krediñ zo pentet
 War an ton bras, à la papa,
 Hag e diegezh memes tra.

45 11. Mar 'n deus drougiezh gant ur re,
 En justis ne gollo morse;
 Atav hep mar en do lañs
 Pa yelo Fantig er valañs.

50 12. Diboanius ral ez eo ar stad,
 N'eus met serrifi e zaoulagad,
 Mont er-maes ur wech an amzer,
 Kanañ dre ma tosta da'r gêr.

13. Evit gwir an holl doganed
 Nend int ket kerkoulz lodemet,
 55 Mes pa n'o dez met an hanter
 O c'hondision zo c'hoazh kaer.

14. Evidon-me tanfoeltr biken
 Ne euredin ur femeleun,
 Mar ne dou din dirak testoù
 60 E vin kornek vel ur c'haro !
 Rak eurusañ den a vale
 Ez eo un dogan, war ma feiz.

7

MEURLARJEZ

War ton : Bezañ zo tud en ti-man hag a oar labourat.

1. Meurlarjes a zo gwall verr,
 Greomp implij ervat
 Deus a ger brao amzer
 En kshit ha ma pad !
 5 Pokomp da'r werenn, pokomp da'r merc'hed
 Rak war arc'hoazh ni vo luduet.

2. Hep dale e paouezo
 Siwazh ar sonerien,
 Ni vo yen bras hor genoù
 10 Ec'h ober pinienn.
 Pokomp da'r werenn, &a.

3. Ret ez eo deomp kimiadiñ
 Dimeus an holl friko,
 Bremañ e c'hellfomp debriñ
 Met yod ha patatoù !
 15 Pokomp da'r werenn, &a.

4. E-lec'h ar biniou laouen
 E klevfomp ar c'hleier
 E-lec'h lipat jigodenn
 Ni lonko gwin glesker !
 20 Pokomp da'r werenn, &a.

5. Ar merc'hed yaouank brema,
 Vit gounit o faskoù,
 Ne andurfont ho stardañ
 Nemet a nebeudoù.
 Pokomp da'r werenn, &a.

6. Mallozh da'r c'hozh pesketaer
 Pehini a ordrenas
 Ober meurlarjes ken berr
 25 Ha korreiz ken bras.
 Pokomp da'r werenn, &a.

7. Mar bân biken pab ivez
 Me a cheñcho ar c'hiz,
 Hag astenno meurlarjez
 War goust ar c'horreiz.
 30 Pokomp da'r werenn, &a.
8. An hini en deus bet graet
 Ar gansouennig-ma
 A zo dister a spered,
 Mes reizh eo da foeltrañ
 35 Pokoù da'r werenn, pokoù da'r merc'hed !
 Goulennit eus an ostizesed.
-

8/

KIMIAD UR SOUDARD YAOUANK (*)

War ton : Eveus ar promesaoù a ran dec'h va Doue.

1. Va c'halon a zo frailhet dre nerzh va ankenioù,
 Em daoulagad entanet neud eus ken a zaerol;
 Allas ! Deut eo an devezh ma rankan dilezel
 Lec'h kaer ma bugaleaj, ma bro dous Breizh-Izel.
- 5 2. Adieu dit va zi bihan, war leinig ar grec'hienn,
 Tachennig c'hlas war bîni bugel e c'hoarien,
 Gwez ivin ker bodennek en disheol eus pere
 E-pad tommier an hañvoù e kousken da greisteiz.
- 10 3. Adieu, va mamm ha va zad, breman n'esperit mui
 E chomfe ho mab karet vit harpañ ho kozhni,
 Vit pourveziñ dec'h bara vel m'ho peus graet dezhañ,
 Al lezenn zo didruez, ho kuitaat a rankan.
- 15 4. Nag a wech, ma mamm dener, e rankafet gouelañ,
 Pa zeuy ma c'hi ankeniet ouzhoc'h d'en em frotañ,
 Pa welfet barzh an oaled, va skabellig goullo,
 Hag ar c'hevniid o steuñviñ ma fennbzh dero.
- 20 5. Adieu, bered ar barrez, douarol benniget,
 A c'holo va zadoù kozh gant Doue bet galvet,
 Da ouel an anaon, klemmus n'in mui war ho peziou
 Da skuilh an dour santel mesket gant va daerol.
- 25 6. Adieu, va muiañ karet, va dousig koant Mari,
 Ur blanedenn diremed a zeu d'hor glac'hariñ,
 Hon eurusted, hon joaiou skedus zo tremenet
 Vel ur goumoulenn skañvik gant an avel kaset.
- 30 7. Ne welin ken da lagad ker lemm ha ker laoden
 O virviñ a blijadur du-se pa erruen;
 Da zornig ker degajet o kas ar c'harr en-dro
 Da vouezh dous ken ne glevin é kanañ ma gwersoù.
8. Pa oamp er c'hatekismoù hon-daou c'hoazh bugale,
 Hon c'halonoù tenerik dija en em gleve;
 Dirak Gwero'hez ar C'hroazhent, nag a wech e touejomp
 Na erruje birviken disparti entrezomp.

9. Yaouank ha discoursius, allas ne quiemp ket
 Pegement a enkresioù er vuhez zo mesket;
 35 Evidomp ne oa neuze legennoù na rous,
 N'anvezemp met ul lezenn, hini ar garantez.
10. Adieu, va nes amezeg, Yannig va gwir mignon,
 Kamalad va c'hoarioù, va breur dre ar galon,
 40 Piv, siwazh, a gemero ul lod eus ma foanioù,
 Piv brema pa vin seder ganen-me a c'hoarzh ?
11. Hep da vreur, te yel brema er parresioù nesañ
 Da bigosat al leurioù barzh al lazoù dornañ;
 Hebon, te yel da zispud maout ar c'hourenadeg,
 Da sachañ war ar ruban e-barzh er varc'hadeg.
- 45 12. Adieu, va c'hi kaezh Mindu, va leal kamalad,
 N'efomp ken deus ar beure da glask roudoù ar c'had,
 Ne glevin mui er menez da chilpadem skiltrus,
 War va dorn mui ne santin da deod karantezus.
- 50 13. A-benn un nebeut amzer kals a vignoned yen,
 Barzh er soudard disvroet, moarvat, ne soñjfont ken;
 Mes da galon-te, Mindu, n'eo ket ker ankounezhus,
 Pell e ri c'hoazh va c'hañvoù dre da yezhoù klemmus.
14. Adieu, va c'hazeg velen, skañv evel un haizez,
 Mistr evel ul logodenn, jentil vel un oanez;
 55 Ne 's santin mui, endanoc, gant an hast o tripal,
 Ma daouarn mui ne stagfont ar ruban war da dal.
15. Adieu, holl blijadurioù, foarioù, pardonioù iêz,
 Soubennoù laezh, nozvezhioù, festoù, leurioù nevez,
 Ebatoù ker birvidik, biniou sart ha sklintia,
 60 Ne drido ken va c'halon gant da sonioù lirzhin.
16. Adieu, kement a garan, adieu, da virviken,
 Pell deus a Vreizh me varvo, mantret gant an anken,
 Bezañ 'z eus plant kizidik, da chom a-blas krouet
 A weler o tisec'hañ raktal m'int disvroet.

Seurezed fur ha santel, a oar ker brav ruziañ,
 Evit ho silvidigezh, serrit prest al levr-ma,
 Rak mar troet ar feilhenn, me bromet dec'h ervat
 Ne vo ket war ur c'hantik e taolfet ho lagad.

5 Dre ur gwall kuriusted,
 En pav Insifer mar kouezhet,
 Deus ho koll me a vo divlam,
 Evel an oan en kof e vamm,

10 Rak lâret em eus dec'h casse-cou, evel ar Gall
 Pa vez o c'hoari mouchig-dall.

A N D E N S A M M E T P O N N E R

War ton : Ar plac'h-man savas da'r gwener,
 Pe war ton : Merc'hed Karrahez.

1. Bezañ zo e-barsh ar gêr-ma
 Un den deus ar maleurusañ,
 Seizh lev tro-dro kement vez graet
 Holl war e choug ez int sammet :
 5 Nend eus ket, war a leverer,
 Falloo'h hailhon evit Albert.
2. Mar gweler ur c'hoef chifonet,
 Ur golinetenn difreget,
 Mar vez flastret ur bern kolo,
 10 Mar diflip un aël dizano,
 Raktal e lavar ur gomer :
 Piv a zo kaoz nemet Albert ?
3. Mar leker, e-lec'h ur bod mae,
 15 Ur vodenn spenn pe un troad leue,
 Mar vez droug en korf ar person,
 Mar bez moredu ar sermon,
 E lavaro seurezed kêr :
 Piv a zo kaoz nemet Albert ?
4. Mar n'aer ket nemeur da gofes,
 20 Na da'n ofern gwall allies,
 Mar chañs da veur a blac'h risklañ,
 Mar blij da'r baotred mont d'evañ,
 Da bask mar vez kalz tapet berr,
 Piv a zo kaoz nemet Albert ?
5. Mar 'deus meur a vamm nec'hamant
 25 Abalamour d'he merc'hed koant,
 Mar golo 'nê gant he askell
 Vel ar yar pa wel ar sparfell,
 Daoust da se mar o dibluñver,
 30 Piv a zo kaoz nemet Albert ?

6. Mar gweler (pezh n'eo ket iskis)
 35 Meur a blac'hig kaezh diaviz
 O kemer, dre gwall blanedenn,
 Un naer evit ur silienn,
 Mar rank hiraat he davanjer,
 Piv a zo kaoz nemet Albert ?
7. Mar gweler merc'hed ha paotred,
 40 Evel diaouloù dichadennet,
 O terekek da'n ebatou,
 Pa glevont mouezh ar biniou,
 Mar kwezhont en pav Lusifer,
 Piv a zo kaoz nemet Albert ?
8. Mar dichenñs da veur a baour kaezh
 45 Tentet gant ar briedelezh,
 Santout, noz kentañ e eured
 Digoret frank dor ar gaoued,
 Hag ast ar pabor gant al laer,
 Piv a zo kaoz nemet Albert ?
9. Mar gweler meur ozhac'h lorc'hek
 50 E tougen ar boned forc'hek,
 Mar ra kalz, er sakristiri,
 Fals sinadurioù hep pec'hif;
 Mar 'n deus mab un togn ur fri kaer,
 Piv a zo kaoz nemet Albert ?
10. Merc'hed mignon ha disoursi,
 55 Pa chañs dec'h mont en un ti,
 Mar bez eno ar c'hliant-se
 Sofjet skampañ, hag hep dale,
 N'oc'h biken en brasoc'h danjer
 Eget pa'z oc'h tost da Albert.
11. En ur ger, an holl daolioù kaer
 60 A vez tamallet da Albert.
 Mar vez gwelet, a-benn kant vloaz,
 An Antikrist o tispakañ,
 Raktal, me bari, e krifer :
 65 Resusitet ez eo Albert.

11

D I V I Z

ENTRE UR C'HLIANT YAOUANK HAG UR RISKLEREZ KOZH

War ton : Kimiañ paotred Plouillo.

1. AR PAOTR : Leveret din, moereb Kato, ~~bet~~ ez oc'h-hu koant gwechall ?
 AR PLAC'H : O nann, biskoazh, va mignon kaezh, koantiri zo un dra fall
 Koulskoude e oan plac'h terrupl, degajet, kroc'henet kaer,
 Va lañchenn distagellet mat, va lagad lemm ha seder.
- 5 2. AR PAOTR : Leveret din, moereb Kato, bet ho peus servijerien ?
 AR PLAC'H : O nann, biskoazh, va mignon kaezh, ne c'houll ket ar vele
 Koulskoude ne oan ket skornet, plijout a rae din Pipi,
 Ha pa frote ur plac'h all e santen vel jalouzi.
- 10 3. AR PAOTR : Leveret din, moereb Kato, teneraet 'deus ho kalon ?
 AR PLAC'H : O nann, biskoazh, va mignon kaezh, rak ar pec'hed em boa
 Koulskoude ur sulvezh pardon, e c'houllas ker brav ouzhin
 Reiñ dezhañ un toullad pokoù, ma voe ret din asantifi.
- 15 4. AR PAOTR : Levret din, moereb Kato, oant ket pokoù penn-da-benn ?
 AR PLAC'H : O nann, biskoazh, va mignon kaezh, n'avanturis ma c'hroc'h
 Koulskoude un nozvezh bennak ma oan o prezeg dezhañ
 E prezegas ker brav ivez ken a risklis, a gredan.
- 20 5. AR PAOTR : Leveret din, moereb Kato, risklet ho peus c'hoazh goude ?
 AR PLAC'H : O nann, biskoazh, va mignon kaezh, nemet an noz maleurus
 Koulskoude vit lâret gwir, alies pa zimnen,
 E vijen meurbet souezhet o kaout Pipi em barlenn.
- 25 6. AR PAOTR : Leveret din, moereb Kato, risklañ rafec'h c'hoazh breman ?
 AR PLAC'H : O nann, biken, ma mignon kaezh, gwell ve ganen perisañ.
 Koulskoude mar ve ret absolu ober se d'ho soulajiñ,
 Ne'm bez ket asur ar galon da zonet d'ho refusifi.
7. AR PAOTR : Leveret din, moereb Kato, dre an hent-se 'z eer da'n neñv
 AR PLAC'H : O nann, biken, va mignon kaezh, ne gevfet ker reizh hag e
 AR PAOTR : O trugarez, moereb Kato, ho kelega n'eo ket fall,
 Ha koulskoude vit 'n em salviñ me gemero un hent all.

12

K A Z H P I P I

War ton gallek : C'était de mon temps que
vivait Madame Grégoire.

1. Merc'hed ar gêr-man
 O deus aon bras rak targash Pipi;
 O welet 'nezhañ
 Piv koulskoude en defe disfiz ?
- 5 Ker dous eo e selloù
 Ker mignon e dresoù,
 Mes Janedig, Mari, Helena,
 Lies a lavar en ur ouelañ :
 Na fourgaset ket
 Ar c'hañ pa vo kousket.
- 10 2. Pipi hag e gazh
 O-daou a oa kousket en ur prad,
 Setu Louiza vras
 Dioute simulik é tostaat.
 (Allas, ar merc'hed kaezh
 A zo gwall dievesh)
 En ur c'hoarzhin e lâre Louiza :
 Kousto pe gousto vit ar wech-ma
 E vo fourgaset
 Ar c'hañ a zo kousket.
- 15 3. Vit en dihunif
 Goustad e harlig penn ar bisig,
 Sevel a reas e fri
 Mes diouzhtu a-zirak Louizaig
 N'en deus ket kemeret
 Ur stumm drouk ha feuket.
 Kontrol da se, min dous ar c'hliant
 A seblante lâret : Merc'hed koant,
 Dinec'h fourgaset
 Ar c'hañ pa vo kousket.
- 20 30

4. Gant herrder eta
D'en cherisañ ez eo 'n em lakeat
Ha da bolisañ
Gant he dorm e groc'hen marellet.
35 Mes an treitour ganti
A sailh evel ur o'hi,
A daolioù dent ken na strink ar gwad,
Keuz zeus da'r plac'h (diwezat)
40 Bezañ fourgaset
Ar c'hazh pa oa kousket.
5. Velkent a grede
Ne vije kazi sort he gouli,
Hag e tremenje
Evel ma tremen meur a hini,
45 Mes skilfoù an targazh
A oa binimus bras,
Ha prest e voe gwelet he barleñ
En em c'hwezhañ vel ur glogoreñ,
'Ege 'doa fourgaset
50 Ar c'hazh a oa kousket.
6. Ar plac'hig neuze
Ar medisin he deus koñsultet,
Mes deus ar boan-se
E lavarar ne oa ken remed
55 Met lakeat al loen kriz
Da lipañ ar gouli
Mar bez divulum e c'henoù
Gant louzaouem *ego coniungo*.
Mes dija gant Janed
Ar c'hazh a oa paket.

War ton : Bravañ pemoc'hig zo er vro.

1. Pipi a zo ur gwaz nerzhus
Ur paotr gadal hag ebatus,
Mes pladennek vel un azen
Rak pa vez en-tal va c'hichen
5 Ne oar nemet huanadif,
Regen diwezat eo Pipi !
2. Ne vez ket ret dezhañ goulenn
Mar c'hwezhe warnon e kouezhfen,
Mes ur gomz dimeus va genoù
10 Pe da'n hireañ ur c'houbl pokoù
Zo en tu-hont d'e gontantiñ,
Regen diwezat eo Pipi !
3. Un devezh ma camp o tommañ,
E lâras din, en ur ruziañ :
15 Gwelet a reer las ho loeroù,
Izelaet un tamm ho prozhioù
Pe me skampo er-maez an ti !
Regen diwezat eo Pipi !
4. Disul em c'havas kousket mat
20 A-hed va c'horf e korn ur prad,
Na petra reas Pipi gouer,
Nemet dec'haloupat da'r stêr
Da gerc'het dour da'm dihuniñ,
Regen diwezat eo Pipi !
5. Ur noz na oa nemet hon daou
25 (Me vo devet ma lâran gaou)
E chañsas da'r gouloù mikañ,
Mes deus a se lec'h profitañ
E taredas d'en alumif,
30 Regen diwezat eo Pipi !

6. Ur wech all dezhañ e lâren
Penaos lies ez ankouazhen
Prennañ doradoù an antre :
Taolet pled mat, 'mezañ, deus ee,
35 Rak dont hallfe al laer en ti,
Pegen diwezat eo Pipi !
7. Un deiz ma oa dezhañ tommet
Ez harlikas din va morzhed,
Ha me raktal d'e vriata.
40 Aiou ! 'mezañ, 'z et da'm mougañ,
M'ho ped en gras da'm fardonif !
Pegen diwezat eo Pipi !
8. Em gourvez, endan ur wênn faou,
Oan é sellat deus an delioù;
45 Kerkent va genaoueg ivez
Zo 'n em astennet vel ul leue
Em c'hichen vit o c'hontemplif.
Pegen diwezat eo Pipi !
9. Paotred yaouank pa c'hoantefet
Gounit kalonoù ar merc'hed,
50 Pa sell ar plac'h eus an delioù
C'hwi dle sellat eus ar gwrizioù;
Ha neuze na lâro ket hi :
Pegen diwezat eo Pipi !

War ton : Ar mañsoner.

1. Er barrez a zo un doktor hag a bosed ar skiant
Da jentileat en daou vunut, da'n touro'h ar miañ friant.
Ne ves ket kavet, me bari, er rouantelezh antier
Un den akuitoc'h egetañ d'ober sparloù da'r saout laer.
- 5 2. Gwechall em eus bet lavaret oa skrivet em flanedenn
Vijen Pitou pad ma buhez, met siwaañ 'n em dromplañ raen;
Santout a ran n'on ket akuit da herzel deus ar vicher,
Ma yel, en desped da'r merc'hed, d'ober sparlañ va buoc'h laer.
- 10 3. Va c'horf am eus bet tanfoeltret oc'h ober vat da'n nesañ,
Deverraet em eus va buhez ouzhpenn deus a ugent vloaz,
Kollet va reputation, va ens ha va amzer;
Me yel, en desped da'r merc'hed, d'ober sparlañ va buoc'h laer.
- 15 4. Nend eus ket e-barzh ar bed-ma maleurusoc'h destini
Eget an hini a c'hortoz ar Pitou em e gozhi :
A bep tu en deus trubuilhoù, displijadur ha mizer,
Me yel, en desped da'r merc'hed, d'ober sparlañ va buoc'h laer.
- 20 5. Dimeziñ zo un diotach, rak kals deus ar vugale
Na tad na mamm ne respetont, met enkreiz nend eus gante,
Ar vero'h a risklo he c'hroc'hen, ar mab a vo pitaouer,
Me yel, en desped da'r merc'hed, d'ober sparlañ va buoc'h laer.
- 25 6. En deiz all em boa gwelet ur paour kaezh pratisien
En deus tapet glogoremoù a-gremdost d'e senturenn.
Allas, en-touez ar bokedoù, eo bet flammet gant un naer,
Me yel, en desped da'r merc'hed, d'ober sparlañ va buoc'h laer.
- 30 7. Alies a glevan lâret ez eus kals a skolerien
Hag a zo kanfarded soutil evit ourlañ al lien,
Vit lemel d'e ar friantiz, gwellañ remed zo d'ober,
Ez eo, en desped da'r merc'hed, lakaat sparlañ o buoc'h laer.
8. Paotred, graet ho peus evel don pa roulen ma yaouankiz,
Brema pa's on krenn distroet, heuliet ivez va diviz,
E-lec'h bezañ treut ha kastiz, c'hwi vo lart ha livet kaer,
Mar 'z et, en desped da'r merc'hed, d'ober sparlañ ho buoc'h laer.
- 35 9. Ne vezo ken glogoremoù, ne vo ken a zoganed,
Ne vo ken a risklerezed, ne vo ken a friponed,
Vo ken bugale dizano, badeziantoù hep kleier,
Mar 'z eer, en desped da'r merc'hed, d'ober sparlañ ar saout laer.

K O F E S I O N U R P A O T R D I L I K A T

15

1. AR PENITANT : Gant ur glac'har vras em c'halon,
Va zad, on deut d'ho kavet
D'ober dec'h ar gofesion
Deus va buhez debordet.
- 5 AN TAD : Dirollit 'ta ho chapeled,
Besit gwirion penn-da-benn,
An absolvenn a veritfet
Mar ho peus ur gwir anken.
- 10 2. AR PENITANT : A-viskoazh on bet ur c'hanfard,
Ur merc'hetaer a'r gwashañ,
Ne oan met un tammig krennard
Ma karen kalz o stardañ.
Pa welen ur plac'h koant bennak,
Va gwad emnon a verve,
Va c'halonig a rae tik-tak.
- 15 AN TAD : Na santec'h mann ouzhpenn se ?
3. AR PENITANT : Ur blijadur deus ar vrasañ
Am boa o welet Mari,
Bep noz deus en em dic'hwenañ
Hag o sikour anezhi.
- 20 AN TAD : Gwelloc'h e vije bet dec'h-hu
Diskiñ ho katekismoù
Pe monet da c'hoari dotu
Vit dic'hwena merc'hedol.
Pet hoc'h eus-hu c'hoazh dic'hwenet ?
- 25 4. AR PENITANT : Ne oun ket ervat, ma feiz,
Rak abaoe dek vloaz tremenet
Ez heuilhan ar vicher-se.
- AN TAD : Lêret din diwar-benn ar gentañ ?
- 30 AR PENITANT : O va zad, me ho tisfiz
Da gavet e-barzh ar gêr-ma
Ur plac'h ken tentus hag hi.

5. Nam, biskoazh n'ho peus bet gwelet
Ul lagad ker birvidik,
Un tammig korf ker brav strujet,
Ur bale ker manifik,
Ur begig flamm vel ur rozenn,
Ur selloù lemm ha lirzhin,
He blev du vel ur vouarenn.
- 35 AN TAD : Kit eta betek ar fin.
- 40 6. AR PENITANT : Dek vloaz zo bet da veurlarjes,
Ya, soñj mat em eus dalc'het,
E ris ar pec'hed mignon-se.
- AN TAD : Livirit mat vel m'ho poa graet !
- 45 AR PENITANT : Barzh en he zi pa erruis,
E kavis ma dousig koant
O tilemel krak he hiviz.
- AN TAD : Re eurus e oac'h, kliant !
- 50 7. AR PENITANT : 'N em lakaat a eure da cuelañ
Pa rois ur pok dezhi,
Ha me raktal d'he briata.
- AN TAD : Isign vat d'he c'hoñsoliñ.
- AR PENITANT : A-gremndost e oa ur gwele,
Warnezhañ ez omp kouezhet.
Ar rest ouzoc'h koulz ha me.
- 55 AN TAD : Nann da, ne oun sort ebet.
8. AR PENITANT : Eno seizh gwech e tañveis
Diouzhtu ar frouezh difennet
Fini a gavis gwall iskis
- 60 AN TAD : Va mab, brabañsal a ret.
- AR PENITANT : Mar ne lâran ar wirionez
Me c'houlenn bezañ spazbet
Vel ur porc'hell pe ur c'hole.
- AN TAD : Pell zo ho peus meritet.

- 65 9. AR PENITANT : Abaoe ma'm eus bet tañvaet
 Ur soubennig ken karapl
 Em eus bet atav kendalc'het.
- AN TAD : Dousaat a ray deo'h, va mab.
- 70 AR PENITANT : O ya, siwazh ! Krediñ a ran
 Ez oc'h un diviner mat,
 Tak tec'hel a rankan breman
 Pa'm bez lipet div loaïad.
-

16

YANN - P I P I , E V E S T R E Z ,

H A G A L L A E R O N

War ton : An Degan.

1. Disul ar peour kaezh Yann Pipi
 [Disul gant e vestrez Mari]
 En-kreiz ar c'hoad en deus kavet
 Ur bagad laeron disakret.
- 5 Da dra-se, peotred, ho tesko
 Da vont da redek er c'headoù.
2. Ul laer a sailhas war Pipi,
 Ul laer a lammas gant Mari.
 Pipi 'n em lakaas da greñañ,
 10 Mari 'n em lakaas da ouelañ.
 An dra-se, &a.
3. Ul laer Pipi a ziskaras,
 Ul laer Mari a zistroadas,
 War e gof a gouezhas Pipi,
 War he c'hein a gouezhas Mari.
 An dra-se, &a.
- 15 4. Ul laer a furche yalc'h Pipi,
 Ul laer a furche yalc'h Mari,
 Pipi vel ur bleiz a youc'he,
 Mari sioul bras a chome.
 An dra-se, &a.
- 20 5. Ul laer a vazhatae Pipi,
 Ul laer a dastone Mari,
 Pipi gaezh en em difenna,
 Mari goant en em difrete.
 An dra-se, &a.
- 25 6. Aiou, ma gouñg, eme Pipi;
 Aiou, ma chouk, eme Vari;
 En gras, 'me Pipi, paouezet !
 En gras, 'me Mari, kendalc'het !
 An dra-se, &a.

7. O ! 'me Yann, gwashañ bazhadou;
 O ! 'me Mari, pebezh taoliou;
 Ez an da vervel, 'me Pipi;
 Ez an da vervel, 'me Mari.
 An dra-se, &a.


30

8. O ! 'me Yann, pebezh aoadenn;
 O ! 'me Mari, pebezh soubenn;
 Ne vin ken tizhet, 'me Pipi;
 Me vo tizhet c'hoazh, 'me Mari.
 An dra-se, &a.

35

9. Pevar miz goude an afer,
 Pipi ne souñje ken el laer;
 Mes Mari goant ne helle ken
 Prennañ souk lasoù he c'horfenn.
 An dra-se, merc'hed, ho tesko
 Da vont da redek er c'hoadoù.

40



I I

O B E R O Û D I S T A G

P E D I E M B A N N

(1 8 3 8 - 1 8 6 6)

17

A R P E M O C ' H

War ton : Maout ar Gov ha maout ar Gall.
 Ou air : Ah ! vous dirai-je, maman.

1. N'ess ket planedenn krisoc'h
 Eget hini ar pemoc'h.
 Barnet eo, war an douar,
 D'ar boanioù ha da'r glac'har,
 5 War ma feiz, me lavar doc'h
 N'eo ket brav bezañ pemoc'h.
2. Gant an holl eo disprizet,
 Gant ar chas eo diframmet;
 Nag en tier nag er-maez
 10 Ne andurer ar loen kaezh.
 War ma feiz, ...
3. Stlejet vez da'r marc'hadoù
 Dre an domnder, dre ar glav,
 Diskaret gant ar seller,
 Dic'harvagnet gant bizier.
 War ma feiz, ...
- 15 4. Meur a bobl 'n deus-hañ lakaet
 Er renk lous ar markened,
 Hag an ano a borc'hell
 A zo un insult marvel.
 War ma feiz, ...
5. Pemoc'h, a lâr Madalen,
 20 Da Yann leun a jigodenn,
 Pemoc'h a lavar ar paour,
 Da'n dostenn karget a acour.
 War ma feiz, ...
6. Pemoc'h ez eo ar brammer,
 Pemoc'h ar c'hozh breugeuder,
 25 Pemoc'h al lous diskempenn,
 Pemoc'hez ar gouilhourenn.
 War ma feiz, ...

7. Ret eo dit, paour kaezh porc'hell,
Soufr ar sparl hag ar minell,
Kontell paotr Gwazivinig
30 Ha mervel dre bav Lipig. (*)
War ma feiz, ...
8. Anton bras, an den santel,
A istime ar porc'hell
Muioc'h vit ar merc'hed koant
..... (**)
35 Mes Iusifer, kalz krisoc'h,
A c'hwezh en reor ar pemoc'h.

(*) E riblenn ar paper e lenner an eilstumm-man :

29a Renoñs, siwazh, da'r gwizi,
30a Ha mervel dre varo kriz.

(**) Mankout a ra ur werzenn. ("Gantañ e save e c'hoant" vel sim.).


18

ALANIG AL LOUARN

War ton gallek : La fanfare du renard.

- | | DISKAN | | |
|----|--------|--|----------|
| | | Bec'h d'Alanig !
Tan da'r peilhaer !
Bec'h d'Alanig !
Tan da'r muntreer ! | |
| 5 | 1. | Klev, chaseer,
Ar c'horn sklintin,
Penn-da-benn kêr
A son lirzhin. | Bec'h... |
| 10 | 2. | An heol melen
Drek ar menez
A strink laouen
Trezek an neñv. | Bec'h... |
| 15 | 3. | Ar glizhenn drant
He deus skuilhet
Boullou arc'hant
War an havreg. | Bec'h... |
| 20 | 4. | Sav goustadik,
Deus da wele,
Lez Margodig
Kreiz he hunvre. | Bec'h... |
| | 5. | Prim war da skoaz
Da fuzuilh vat,
A-raok brema,
War-zu ar c'hoad ! | Bec'h... |
| 25 | 6. | Flambo, Tano !
Gwaskomp, paotred !
Alan fino
Zo diskampet ! | Bec'h... |
| 30 | 7. | Vel ur labous,
Vel ur vouled,
Ar loenig rous
A red, a red. | Bec'h... |

- 8. Dreuz ar girzhier
Dreuz al lannioù
35 Alanig laer
 A glask troioù. Bec'h...
- 9. Ar chilpadenn
 Stank ha raouliet
 Hed an draonienn
40 A gan bepred. Bec'h...
- 10. Mes ar c'hanfard
 En deus luziet
 Ar gudenn start
 Ha 'n em laeret. Bec'h...
- 45 11. Pan, pan ! Daou denn !
 O reuz garo,
 War an dachenn
 E ruilh maro. Bec'h...
- 50 12. Ar chas kerkent
 Feurgomaret
 A daolioù dent
 Deus hañ brevet. Bec'h...
- 56 13. Ar chaseer
 Teir gwech a gri
 A vouezh seder
 An halali ! Bec'h...



AR MEZVIER

War ton : Ar Mañsoner .

- 1. Pa welan 'n heol o tigeriñ en oabl e lagad melon,
 Me salud e fas lugermus en ur bokat da'r werenn,
 Ar c'hentañ banneoc'h a lonkan zo vit beuziñ ar preñved,
 An eil vit 'n em dibikouziñ, ar peurrest vit ar sec'hed.
- 5 2. Ar gwin a zo ur louzaouenn vit gwellaat an holl boanioù,
 N'eus ket gwelloc'h deus al laerez, deus ar remm, ar pistigoù,
 N'eus ket e bar deus ar sifern, ral eo deus an daculagad,
 Mes ma feiz, deus ar boan galon, e santan n'eo ket gwall vat.
- 10 3. Ar gwin a ro hardizhegezh, nerzh kalon da'r boltroned,
 Roit ur banneoc'h d'ur c'honikl, hag e peilho ur fured;
 Ar c'had gant ul lomm jigodenn, a rebarbo deus ar c'hi,
 Mes ne redo ket gwall vuan, gallout a ret va c'hrediñ.
- 15 4. Ar gwin a zeu d'hon o'hoñsolif deus an holl afliksionoù,
 Ha dimeus ar briadelezh da skañvaat ar chadennoù,
 Alies deus ur genaoueg e ray un den a spered,
 Mes evit lipraat an teodoù nend eo ket ur gwall remed.
- 20 5. Ya, m'en tou dre ano Bakus, doue bras ar roulerien,
 Bep nos da'r gêr me zistroio a-ruilh vel ur varikenn,
 Ha ma fell da Fant ravodiñ re deus a sermonioù
 Gant ur pezh mat a geuneudenn, me serro dêi he genoù.



War ton gallek : Un sous-lieutenant, &c. Drinn
Drinn, Drinn.

Drin, drin, drin.

1. Matiaz kozh, e gorn endan e fri,
E jod ruziet gant ur bannec'hig gwin,
A lavare en ur huanadiñ :
O ! me zo bet, em amzer, ur poñsin !
- 5 2. Va blev velen, ken flour evel al lin,
War ma chupenn a ruilhe rodellet,
Va gar nerzhus a oa turniet ken fin,
Va daoulagad lemm evel ar stered.
- 10 3. Nann, ne oa ket er seizh parrez nesañ,
Ur paotr yaouank ker galloudus ha me,
Ken sonn a gorf, ken ledan a zivskoaz,
Ken brav stummet e-barzh en e wele.
- 15 4. Er gourenoù, me a vounte paotred,
Ar maout e oan en holl marc'hadegoù,
War ar jiber ne vanken tenn ebet,
Ar blev, ar pluñv, holl e ruilhent maro.
- 5 5. Den ne ouie evel don c'hoari vazh,
Den ne samme ur sac'had ponneroc'h,
Den ne zouge sonnoc'h ar hannel bras,
Da gas ur marc'h ne oa den akuitoc'h.
- 20 6. Vel un eostig me a ouie kanañ,
Vel ur c'hloareg me a ouie rimal,
Da'r merc'hed koant oan ar c'hog da gontañ
Hag en dachenn, hep par evit dañsal.
- 25 7. Er pardonioù, gwechall pa bourmenen,
Gant ho mamm-gozh, Doue d'he fardono,
E lâre 'n holl, pa vijemp o tremen :
Setu aze bravañ koubl zo er vro.
- 30 8. Brema, siwazh ! brema, bugaligoù,
N'on met ar skeud deus ar pezh ma'z on bet,
Ma fern zo moal, ma daoulagad maro,
Ma choug krommet, ha ma c'hof-gar teuzet.

Gwerz truezus war ton : Gastibelza.

1. Va blev em penn a sav vel reun ur porc'hell
En ur gompren
Gwashañ torfed zo c'hoarvezet en Kastell
Er bloas tremen.
- 5 2. O tud tener, dispakit ho torch-listri
Rak ar werz-ma
A lakaio an daeroù hag ar mic'hi
Da ziflistrañ
Ya, da ziflistrañ.
- 10 3. En Kastell-Paol, brema n'eus ket pell amzer,
E oa ur c'hi
Vel e berc'henn jentil, dilikat, seder,
Lemm-lemm a fri.
Mes dreist an holl, e dammig lost rodellet
A oa hep par;
Perak, siwazh, ez eo bet dic'houbennet
Gant ur barbar
Ya, gant ur barbar.
- 20 4. Azorig kaezh un devezh zo erruet
En ur yudal,
Penn, kil ha troad gant e wad nobl mastaret,
O reus fatal !
E lostig koant, feniks eskopti Kemper,
Oa diveget;
Vel un aspig gant fals lemm ul labourer
Daouhanteret,
Ya, daouhanteret.
- 25 5. Va mouezh dister, birviken ne lavaro
Ar fulor kriz,
An aradem a drelatas an aotrou
Pa wel e gi
Un diaoul kornek gant ur person asperjet,
Ur c'hozh targash,
Un naer-wiber barzh en he zoull fourgaset
N'int ket ken gwazh,
Nann, n'int ket ken gwazh.
- 35

5. E dok kampet war e bann a añfonsas,
Hag e gleze,
Gwerc'hez jentil, gant ur c'houris a stagas
Deus ha c'hostez.
40 Neuze kerkent en em strinkas konnaret
Dre ruioù kër
Vit pulluc'hiñ an torfedour milliget,
An diloster,
45 Ya, an diloster.

6. Vit en sikour, un archer a gemeras
Hag hep dale,
En stal ar Bos, a lammoù feuls e sailhas
Vel ur c'hole,
50 En ur vlejal : mallozh, mallozh da'r muntret !
Gwashañ poull gwad !
Testoù ! Testoù ! Deus an druilh, deus ar milier,
Ar c'hrog zo mat,
Ya, ar c'hrog zo mat.

55 7. Dirak ar juj, Ar Bos a voe intimet
Emlan eizh deiz,
Ha da'n amant evel un truant barnet
Gwall didruez,
60 Evit bezañ dre fallentez dilostet
Un aneval
Fini biskoazh ne oa bet ennañ kroget
Nag en den all,
Nann, nag en den all.

8. Ar binijenn re dister a oa kavet
65 Gant mestr ar c'hi,
Ar Bos kaezh a-nevez sinifiet
Gant ar gripl,
Barnet arre da zic'haouiñ ar perc'henn
Ha da'r mizoù,
70 Ouzhpenn se c'hoazh da rentañ en berr termen
Lost an toutou,
Ya, lost an toutou.

43

9. Ar merzher paour terrapl bras a voe nec'het
Hellit kredif
75 Evit rentañ pezh n'en devoa ket laeret,
Baskell ar c'hi
Neuze soñjas en tribunal Montroulez
Ober apel,
80 Evit lakaat terriñ ar varnidigezh
Deus juj Kastell,
Ya, deus juj Kastell !

10. En Montroulez, un arest a oa rentet
Hag a ziapoz
85 Eo amilet an div varn a-raok douget
Enep Ar Bos.
Hag ar mizoù, holl sec'h ha glas endrammet
'N ur c'hevread
Ha diresped war choug an Argus sammet.
90 Rebezh friad,
Ya, pebezh friad.

11. Gouelet dourek brema war stad Azorig
O chas tener !
Lipit gouli ho kamalad reuzeudik
En dizesper.
95 Ha mard ouzoc'h piv 'n deus eñ dizenoret,
Pa dremeno
Savet ho kar, a-wel ur stivell staotet
Leizh e vragoù,
Ya, leizh e vragoù.

1. Pesk ebrel na pa 'c'h eus va digoret
 ⑥ pesk a-walc'h !
 Enkenet out gant ur c'hozh linenn torret
 Hep reün na dalc'h.
 5 Ha koulskoude er gêr vras a Werliskin
 E leverer
 Ma'z eus er bed ur spered lemm, ur paotr fin,
 Ez eo Prosper. (bis)
2. Ha n'int ket sot, ar Gwerliskiniz kaezh
 10 War ar poent-se;
 Se oar an holl en kêr ha war ar maez
 Koulz evel te.
 Kent, pa vije klevet kan ur son nevez
 En hon c'harter,
 15 Piv 'n deus hi graet ? Ne oa nemet ur vouezh
 Prosper, Prosper ! (bis)
3. Allas siwazh ! Kollet en deus e bombard
 Hag e flêut;
 20 Deus e sonioù, memes an deveshioù lart
 N'eus ken a vrud.
 Ne chom gantañ nemet danvez ur sutell,
 Ur sutell verr,
 Marteze mat evit ober ur stivell...
 Paour kaezh Prosper ! (bis)
4. Lennet em eus e-barzh e fabloù Ricou
 25 Na diwar-benn
 Ul leon kozh a oa brevet a daolioù
 Gant un azen !
 E Kernev oa penn kentañ an holl barzhed
 En e amzer.
 30 Daoust ha brema vit ober ul Leonard Louet
 Gollo Prosper ? (bis)

1. Mero'h Fantig koant zo partiet
 Dilun diwezhañ da Gemper,
 Honnezh, ma Doue, oa, pentet
 5 Nam, biskoazh ne oa bet ken kaer.
 Ur c'hoef dantelezh war he fenn,
 Voulouz penn-da-benn he dilhad,
 Rubanoù ruz deus he c'horfenn,
 Mes n'he doa ket he botoù-koad.
2. Lakaet he doa en he spered
 10 Na stlejañ da Gemper ganti.
 Ma fortun, emezi, zo graet,
 Bara segal ne zebrin mui.
 Brema me am bo chadennoù
 15 Vel un dimezell a di mat,
 Tokoù seiz ruz, krinolinoù,
 Ha ne zougün ken botoù-koad.
3. Ma genoù digor oa chomet
 Rak n'intenten ket an dra-se,
 20 En ur c'hoarzhin hi zo redet;
 Keno ha beaj mat dit-de !
 Re ger a goust an druilhoù kêr
 Ma brozh raidadur zo gwell vat,
 Me chomo gant va mamm er gêr
 Hag a viro va botoù-koad.

1. Janedig, Janton ha Janed,
Teir blaoc'hig mignon ha seder
Gant an dimeziñ zo troet
D'a lavaras meur a gomer.
5 Pa garin me 'm bo un anê
Rak me zo kilhog er ger-ma,
Mes choaz a rankan entreze
Gant se on nec'het ar muiañ,
Ha perak n'hallan kemeret
10 Janedig, Janton ha Janed ! bis
2. Janedig zo ken skañ he zroad !
Ken ruz, ken flour he zamm begig !
Janed zo ken lemm he lagad !
Ken tentus he divvuzellig !
15 Mes Janton zo ken brav korfet
He mouezh ken karget a zouster
Ken a drid va holl gwazhied
Pa 'n em gavan en he c'heñver;
Ha perak n'hallan kemeret
20 Janedig, Janton ha Janed ! bis
3. Ret ez eo din krak dimeziñ
Ha Janed a vo ma fried.
Mar c'hoanta Doue anezhi
Janedig a vo an eilvet,
25 Mar 'n em gavan intañv goude,
A-benn un toullad bloavezhioù,
Janton a gemerin neuze
Evit bihanaat ma foanioù.
Vel-se, ma feiz, me 'm bo paket
30 Janedig, Janton ha Janed ! bis

War un ton korn chase

1. Louizaig ar Rouz
He deus, war ma feiz,
Daouzek amourouz
5 Ha me c'hoazh gante.
Paour ha pinvidik,
Holl ez omp eurus,
Kalon Louizaig
Zo madelezhus !
10 DISKAN Mes n'eo ket se krak
A blij demp enni;
Divunit perak
Omp dallet ganti ?
2. He blev rodellec
He blev ken melen
15 A zo stlabezet
War he bruched wenn,
He lagad koulmig
A strink fulennoù,
Evel ur muzik
20 Eo dous he c'homzoù.
3. He dent erminig
A zo gwenn skedus,
He divvuzellig
A zo ken tentus;
25 Barzh en he c'horfenn
A lien oa ket,
Zo div gaouledenn
Ken gwenn, ken kalet.
4. He c'horf zo lañset
30 Vel ur ganabenn,
He garig turniet,
He zroadig kempenn;
Digant ur paotr start
Ne refuz a-greñn
35 Nag ur pokig sart
Na memes ouzhpenn.

5.

Nec'het on, ma feiz,
Evit diskleriañ
Perak kement-se
A blij demp, Louiza.
Ato, ar plac'hig
He deus rez begel
Ar c'hoantañ maoutig
Eus a Vreizh-Izel.

40

6.

Deomp, chaseourien,
Da redek ar c'had
A-hed an draonienn
A-dreuz lann ha prad.
Pa guzho al loar
Ni a chaseo
Louizaig hep par
E-kreiz da goadoù !

45

50

DISKAN DIWEZHAN

Setu eno krak
Pezh a blij enni
Ha setu perak
Omp dallet ganti.

55

1.

C'hoant am eus d'ho lakaat da c'hoarzhin
O klevet pezh zo ertuet bis
Gant un ozhac'h dimeus ar gêr-ma
Tireñ lon la, falari don la,
Gant un ozhac'h dimeus ar gêr-ma
A zo bet pilet gant e wreg.

5

2.

An ozhac'h-man ranke luskellat
Ha mont alies war ar stêr, bis
Ha ma ne vije gwenn an dilhad
Kavet bazhadoù leizh e ler.

10

3.

Yann, keit ha ma vezin é leinañ
Lakaet-m' an dour war an tan bis
Da c'holc'hif pladoù ha skudelloù,
Ha podig ar mabig bihan.

15

4.

Yann, et da luskellat ar bugel
En giz ma vin eus en c'hlevet
Pe mar kemeran ma skubellemm,
Bremen souden e vêt foetet.

20

5.

Ma fried arabat eo f'chañ
Monet a ran da luskellet
Kousket aze, ma mabig bihan,
Mar fach ho mamm e vimp pilet.

25

6.

Me ya da di ma amezegez
Da gaozeal un nebeut c'hoazh;
Prepar lein war benn ma'z erruin
Peotramant e vo fest ar vazh.

30

7.

Ma fried, po ho komadite,
Vo prest lein, trempet ar soubenn,
.
Da lakaat gwin en ho kwerenn.

8.

Yann ama a zo manet soubenn,
Debret hervez ho appetit,
Hag askornigoù mat da lipat,
Mes na douchet ket eus ar c'hig.

9. Ma fried me evfe ur banne'h
 Ur sec'hed bras am eus breman...
 35 Kemer da werenn 'ta, ivrognad,
 Te as pez c'hoant deus a bep tra.
10. Gant an hast en devoa d'he riffsañ
 Maleur gantañ zo erruet
 Rak ar werenn entre e zaouarn
 40 Siwash dezhañ a zo frailhet.
11. Jarnikoton ! eme Jaketa,
 Breman souden ni raio bal,
 Diwisk da vragezenn, ma mignon,
 Te 'z vo an disiplin raktal.
- 45 12. Ta flik, ta flak, deus an daou gostez.
 Me ho tesko da derriñ gwer,
 Na netra all deus an tiegezh,
 Goût a ret an traoù a zo ker.
- 50 13. Ma fried, ho pet truez ouzhin,
 C'hwi lako ma gwad da redek.
 Me evfe kentoc'h gant ma botez
 Kent vit terriñ gwerenn ebet.
14. Boutonet ho pragoù, ma mignon,
 Ha deut da bokañ da'r skourjez,
 55 Ha laka evezh biken james
 Da derriñ netra em zi-me.
15. Ar c'hentañ tra dorri en ti-ma,
 Me a secho war vlev da benn
 Ha kerkoulz all war da zivskouarn
 60 Ken a vînt vel re un azen.
16. Rak se 'ta, gwazed yaouank,
 Tachet da blijout d'ho kvragez,
 Pe mar fachont diouzhec'h
 Vehet pilet kerkoulz ha me.

Ma fried me evfe ur banne'h
 Ur sec'hed bras am eus breman...
 Kemer da werenn 'ta, ivrognad,
 Te as pez c'hoant deus a bep tra.

Gant an hast en devoa d'he riffsañ
 Maleur gantañ zo erruet
 Rak ar werenn entre e zaouarn
 Siwash dezhañ a zo frailhet.

Jarnikoton ! eme Jaketa,
 Breman souden ni raio bal,
 Diwisk da vragezenn, ma mignon,
 Te 'z vo an disiplin raktal.

Ta flik, ta flak, deus an daou gostez.
 Me ho tesko da derriñ gwer,
 Na netra all deus an tiegezh,
 Goût a ret an traoù a zo ker.

Ma fried, ho pet truez ouzhin,
 C'hwi lako ma gwad da redek.
 Me evfe kentoc'h gant ma botez
 Kent vit terriñ gwerenn ebet.

Boutonet ho pragoù, ma mignon,
 Ha deut da bokañ da'r skourjez,
 Ha laka evezh biken james
 Da derriñ netra em zi-me.

Ar c'hentañ tra dorri en ti-ma,
 Me a secho war vlev da benn
 Ha kerkoulz all war da zivskouarn
 Ken a vînt vel re un azen.

Rak se 'ta, gwazed yaouank,
 Tachet da blijout d'ho kvragez,
 Pe mar fachont diouzhec'h
 Vehet pilet kerkoulz ha me.

40 Reiñ un dra bennak da sant Per,
Pe ar porzhier kozh a serro
Ar baradoz eus da c'henoù.
P'o devez komzet evel-se
E roont da sant Per adarre.
45 Un Tregeriad ne grado ket
E vez an tzaoù-se gwall bec'hed,
Bepred e talc'ho start d'e feiz
Rak kalon c'hwek zo en e greiz,
Petra bennak darn zo, siwazh,
50 A chom en ur glouarder vras.
Alies e vez lavaret
Tregeriz zo protestanted,
Abalsour un daou pe dri
(Ha n'int ket eus hon eskopti)
55 A ya ur wechig an amzer
Da drempañ da bodig Luther.
Ne reont ama na bleud na brenn,
Re luziet kalz eo o c'hudenn;
Disprizout a rer o levrioù
60 Evel ar fank eus ar botoù,
Bete vrema o c'homzoù flour
A zo evel ur bramm en dour...
En Treger, en Leon, en Kerne
En pep lec'h zo tud a zoare,
65 En kêr kouls ha war ar maez
An den zo graet a bitouilhez,
Tregeriz zo eeun o steuñvenn
Zo tud leal ha tud laouen,
A gar Doue hag e iliz
70 Mes en o c'homzoù int re vrizh.
Ur gwir Tregeriad ne gar ket
Lipat Yannig an difriet,
Gwelloc'h e vez mont, emezañ,
Gant ur bouteg toull da gaoc'hañ.
75 Setu ne vez ket lakaet neuze
Da ganañ : in loco Pascuae.
Me rekset da berson Penmarc'h
Yec'hed hag arc'hant leizh e yalc'h
Evit kaout ha dilhad ha boued
80 Hep rankout mann da zen ebet.

Me zo hag a vo da viken
Gant ur galon c'hwek ha dibrenn
Da vignon : Person ar Pontoù
En deus toulloù hep boutonoù.

MARGODIG KOANT

War don : Gastibelza.

Margodig koant, paotrez he lagad mignon,

A lavare :

Rezh diaoul lubrik a drubuilh din va c'hañon ?

Perak noz deiz

E verv ar gwad e-barzh ma holl gwazhied ?

Ha pa gouskan,

'M eus soñjoù lous war strobelloù ar baotred,

Ken e staotan,

O ya !

Ken e staotan ?

Ma bronningoù bihan, n'eus ket pell amzer,

Vel div brunenn,

A zo breman kement ha tezh un onner

Darev da loen;

Un torkad struj em gaol a zo diwanet

Hag, a wechoù,

E red ar gwad penn-da-benn ma divvorzhed

War ma botoù,

O ya !

War ma botoù !

Tridal a ran pa welan ur marc'h koulhek

Dispak e stol,

Ridet e fri, o sailhat war ur gazeg

'N ur c'hwirinal.

Em c'hwil neuze e vountan ma bizied

Donañ m'hallan,

Ha zig-a-zoug, e talc'han da ribotañ

Ken e vrammen,

O ya !

Ken e vrammen !

E korn ur vur, en ur dremen, pa welan
Lost un aotrou,Em eus mil boan o virout teurel warnañ
Ma c'hrabanoù.

Evel genoù ur pesk en e angoni,

Ma staotijenn

Ne baouez ket da serriñ, da zigeriñ

Leun a c'hlaourenn,

O ya,

Leun a c'hlaourenn.

Drek ur rideoz, a greiz kofes, pa welan

Flemm ar c'hure

O fistoulat vel ur pikol silienn

Dindan e sae,

Neuze santis ma daoulagad o vervel

Vit morediñ,

Hag e taolis ma dorn war ur gorz-avel

Leun a vic'hi,

O ya,

Leun a vic'hi.

En anv Doue, lâd din pelec'h on dalc'het,

Lâd din, Loeiza,

Rak, war ma feiz, mar ned on prim louzaouet,

Rankan foeltrañ !

Margodig kaezh, mecne'm eus ket a louzoù

Vit da gleñved.

Mes Yann an Tbourc'h en deus e-barzh e vragoù

Ur vuredad,

O ya,

Ur vuredad !

1. Fa vin maro, kamaladed,
Ma interet 'kav ar gwin,
Ma zreid dindan ar varikenn
Ma genoù dindan ar pin.
5 An takennoù a zevero
Ma c'halon a soulajo
Ha mar didal ar varikenn
Leizh ma c'horf me a evo.
2. Fa vin maro, kamaladed,
10 Na sonet ket a c'hlaz din,
Sij ar gwer am eus bet torret
Ar re-se a sono din.
Sij ar gwer am eus bet torret
Ar re-se din a sono.
15 An ostiz hag an ostizez
Ar re-se ray ma c'hañvoù.
3. Foet e voutikl, foet e drantenn,
Aet int holl 'n e c'hourlañchemn,
20 A lavaro al laboused
Er c'harzh pa vin o tremen.
Burus ma ne lêront ket c'hoazh
Pezh a ray din muisñ poan :
Du-hont nend eus na sistr na gwin,
Na dour zoken... nemet tan.

- Ma'z oc'h deut c'hoant, va mignoned, da anvezout ur wreg rok,
Me ho konduo, pa garfet, dirak Mari beg a-raok.
Bemdez war-dro un hanter-eur e kluch war dreuzoù he dor,
Kerkent teodoù pig ar c'harter, gant ur skaoñ pe ur gador
5 Kerkent teodoù pig ar c'harter, gant ur skaoñ pe ur gador
A zered holl en he c'heñver : an aodiañs zo digor.
War barlenn Mari, e weler ur pezh foeltrenn asied,
War behini kont pep komer kement he deus inventet.
- 10 Klevet a ret pet den lipous a ya bemdez da'r c'hafe,
Pet plac'h he deus tri amourouz, ha pet a zo stad enne,
Pet plac'h he deus tri amourouz, ha pet a zo stad enne,
Pet ozhac'h a zo mezvier, ha pet a bil o gwraez.
- Mari beg a-raok a gomand war ar c'hoñsailh divragoù,
Hep kaout an nebeutañ damant e tigor frank he genoù.
15 Pa n'he devenus war he bizaj na moustachoù na baro,
Eo ret dêi kaout an avantaj da zikrial tud ar vro.
Eo ret dêi kaout an avantaj da zikrial tud ar vro.
Gevier, sotoni, kozh langaj, tud a bep kalite zo.
- 20 Mari beg a-raok zo titlet vel an uhelañ noblañs,
Domañ eo na ve ket pried d'un pinvidig eus a Frañs.
Hi eo priñsez an diegi, kontez al liboudennoù,
Hi eo dukez al loustoni, markizez ar strakelloù
Hi eo dukez al loustoni, markizez ar strakelloù,
Gouarnerez ar cholori, ha baronez ar pilhoù.
- 25 Kerkent ha ma vez embannet daou zen yaouank da zimñ,
E vez, da'l lun vintin, galvet he c'hoñsailh bras gant Mari.
Pep koñsailher, en gwelenn, a boagn gant e votoù berr,
Evit klask ar gwellañ moean da derrickiñ pront an afer :
Evit klask ar gwellañ moean da derrickiñ pront an afer :
30 Ar plac'h a gar ar jigodenn, pe ar gwaz a zo mezvier.
Ar re washañ da zikrial an dud a ya en fortun
A zo, evit an ordinal, merc'hed chomet hep nikun.

Merc'hed kaezh chomet da gozhañ hep tapout un tammig gwaz
Hag a gomañs brema fachañ dre ma ne deu den d'o choaz.

35 Kerkent ha ma wel un eured o tont war-zu an iliz
Mari beg a-raok a zered en mañchoù lous he hiviz.

Evel ur vuoc'h o vreskiñ e c'haloup hebiou ar ru :
Hola ! Katell, Janed, Ferrin, Soaz, Marc'harid, deut diouzhtu !
40 Hola ! Katell, Janed, Ferrin, Soaz, Marc'harid, deut diouzhtu !
Setu ama eured Martin ! Deut da dremen ar revu.

Va c'homer, sellit eus honnezh, dislivet he zavañjer,
He c'hornetenn zo hep ampez, hag he gweledenn re verr.

O ! Sellit 'ta eus an den-ma, pegen strizh eo e vragoù,
E dok zo brasoc'h evitañ, ha kalz re hir e votoù;

45 E dok zo brasoc'h evitañ, ha kalz re hir e votoù,
Ur chemizetenn zo gantañ war e roched en pilhoù !

Fa vez ur wreg kaezh gwilioudet diwar he bugel kentañ,
E c'houlenn Mari, estonet : Petra, nav miz zo dija ?

50 Me gave din oa an eured da'l lun goude pardon Paol,
Ha pask n'eo ket c'hoazh erruet. Alo, graet o deus an taol.

Ha pask n'eo ket c'hoazh erruet. Alo, graet o deus an taol,
Hep n'o deveus va c'hemennet, kement-se a gavan drol.

Fa glev kloc'h iliz ar barrez o c'hervel d'ur vadeziant,
Mari, gant un troad hep botez, a erru a-raok ar gan,

55 Mes dre valeur n'eus ket ezhomm dimeus ur vouezh ken raouliet
Da sikour kanañ Te Deum evit an nevez ganet.

Da sikour kanañ Te Deum evit an nevez ganet

Gant he c'homerezed e chom e-kichen dor ar vered.

I I I

B O M B A R D K E R N E V

J A B A D A O H A K A N I R I

1 8 6 6

K E N T A Ñ L O D E N N

31 U N T A M M I G K A O Z E A D E N N E T R E Z O M P
L E N N E R H A L E N N E R E Z , K A N E R H A
K A N E R E Z .

War don : An hini gozh.

Mar plij deoc'h va sonioù nevez,
Klaskit d'ê tonioù a-zoare,
Tonioù lirzhin -- Tra, la, la,
Tonioù skiltrus -- Tra, la.

5 Ma o c'havet re enoeus,
Ar pezh a ve din gwall boanius,
Roget al levr -- Tra, la, la,
Hep chipotañ -- Tra, la.

10 Stlapet-hañ prim er fornigell,
Tanet dioutañ ho kerniel,
Paket gantañ -- Tra, la, la,
Louzoù pe soav -- Tra, la.

15 Mailhuret butun ha bloneg,
Torchet zoken ho ... fri, ho peg,
War se vo peoc'h -- Tra, la, la,
P'hoc'h eus prenet -- Tra, la.

20 Hogen, ho pediñ ran ervat,
Lezit va sonioù en o stad,
Ger evit ger, -- Tra, la, la,
Hep o drailhañ, -- Tra, la.

25 Dreist pep tra, n'o mawellit ket
Gant brizh brezhoneg pabored.
Brizh brezhoneg -- Tra, la, la,
Keginerezh -- Tra, la.

Er stumm ma'm eus graet anezhe,
Hep o gwiskañ, -- Tra, la, la,
Hep o fentañ -- Tra, la.

30

Bete goût n'o dianvefen,
Bete goût n'o dianzavfen
Vel bastarded, — Tra, la, la,
Fleutet e gall, — Tra, la.

35

Ha c'hwi tud ouizieq meurbet,
Gwerzerien flour, barzhed touet,
Stlapit ar maen gant ma fri,
Mard oc'h glan a fazi.

40

Va mizerere zo lipet :
A-rack, jabadao konnaret !
Bombard, biniou, — Tra, la, la !
Sutell, viell, — Tra, la !!!

5

A ! perak na'm eus ket
Ho telenn alaouret,
Marzhin, Gwenc'hlan, Riwal,
Barzhed an amzer all ?
Veldoc'h, a vouezh uhel,
Da heiklev Breizh-Izel,
Me a daolje ur c'harm
Skiltr vel hini an arm.

10

Gant ur vouezh ar skiltrañ,
E yezh Breizh ar gaerañ,
Hep ehan, me veulje
Oberoù kaer Doue,
An Doue bras krouer,
E c'halloud, e vraster,
E c'hloar, e vadelezh
A bep peurbadelezh.

15

A droc'h askell gant herr,
Me garfe vel an aer,
Nijal dreist ar goabrenn,
Sellet, hep divalvenn,
Ouzh an heol benniget;
Gwelet an dud bodet,
Evel ur stroll verien,
O virviñ ar bouldrenn.

20

25

Ferak on ken dister !
Evel an alc'houeder,
Pa fell dezhi sevel
Er c'houmoul re uhel,
A renk, timat, diskenn
Da guzhat en ervenn
E askellig faezh,
Me zo velti, siwazh !

30

N'on ket barzh | nam, biken
Ne vrudo ma zeleun,
35 O !nam ! ha koulskoude,
E trid ma holl ene
O welt ar c'hroumm tonus
Gant ur c'hrozmol euzhus
40 O tedarzhañ diboell
Dreist ar c'herreg uhel.
Karout a ran gwelet,
Dre an oabl, al luc'hed
Gant o gourganmoù tan,
Kleuet trouz an taran,
45 Pa strak er goumoulen;
Ar stêr gant he froudenn,
Ar stourm, o c'hwibanat,
Pa zrailh dervenn ar c'hoad.
Karout a ran dreist-holl,
50 Arvestiñ ouzh an heol
Pa strink, eus ar beure,
Dreist kribell ar menez;
D'abardaez, pa guzh,
55 Barzh ar mor islonkus,
O tanañ an meñvoù
Ha kern ar gwagennoù.
E-pad un nozvezh hañv,
Gant eurvad, e karan
60 Gwelet dremm gaer al loar,
Ar rouanez dispar,
Ar stered hep niver,
Hadet gant ar c'hrouer,
E-giz da vleuniou tan,
Dre volzoù an oabl splann.
65 Euruz on pa welan
Ar valafennig skañv,
Gant he c'hamigelloù,
Pa nij war ar bleuniou,
Pa glevan, er vodenn,
70 Al laboused laouen,
O richaneñ dibled,
O son d'o farezed.

75 Me gar, a nerzh kalon,
Kement a zo gwirion,
Yaouankiz ha glanded,
Galloud, ijin, spered;
Gant truez e leñvan,
En-dro din, pa welan,
80 Paourentez, dienez,
Gouliou hag enkreuz.
Kazet em eus bepred,
Pilpouzed, trubarded,
An teodoù binimus,
85 Ar vezventi fankus,
Mignoned diwirion,
Tostenned digalon,
Stouet rak al Leue Aour,
Didreuz ouzh ar paour.
90 A ! perak na'm eus ket
Ho telemm alaouret ?
Hep ehan me veulje
Oberioù kaer Doue,
Me zrailhje, hep paouez,
95 Dindan seul va botez,
An holl amprevaned
A skuilh binim er bed !

DA YANN ARC'HANT E PARIS

Ur gwir vugel
Da Vreizh-Izel
A ra enor
D'e vamm Arvor.

100

O tremen parrez Kalanel,
En em gavis rez ur chapel;
Ur chapel savet a-nevez
Da sant Erwan ar Wirionez.

5 Us an nor-dal zo kizellet
Skoed Du Parc. aotrouhez brudet,
Gant e ger : Trec'hiñ pe mervel !
Ger tud dispouron er brezal.

10 Ya, c'hwi zo bet tudjentil reizh,
Marc'heien galloudek a Vreizh.
Fegen kaer e yoa ho kwelet,
Start, taer, war ho kezeg sternet.

15 En em strinkañ, vel an taran,
Gant ho kleze dir, en emgann,
A-raok bepred, sonn ho pannel,
O krial : Trec'hiñ pe mervel !

20 Ho kwad, vel dour, en deus redet,
Vit gounit bez salver ar bed;
Du Parc eo unan an Dregont
A drec'has ar Saoz divergont.

25 Stourmet hoc'h eus bet da'r maro
Vit ar roue, ar feiz, ar vro,
Marvet, an dorn war ho kleze,
Ho taoulegad war-zu an neñv.

30 An amzer gant he falc'h garo,
En deus roget ho pannieroù,
Diskaret tourioù ho kestell,
Poultrennet eskern ho kernel.

35 Hogen, chomet zo koulskoude
Ur barzh dister oc'h ho lignez,
Evit kanañ, e yezh Arvor,
Meuleudioù bras d'hoc'h eñvor.

DA'N ITRON MARIE-ANGE DU PARC A
ITRON, c'hwi zo merc'h oc'h o gw
Hag en anzav a rit gant stad;
Miret hoc'h eus karantez Breizh,
Bro al lealded hag ar feiz.
Deoc'h e kinnigan va gwerzioù,
Dister, vel brug hor menezioù,
Hag ho kalon wir a drido,
O klevat heklev oc'h ar vro.

War don : Al labourer.

1. Ma c'halon a zo frailhet dre nerzh ma enkrezoù,
Ma daoulegad entanet n'o deus mui a zaeroù
Deut eo siwazh ! an devezh ma rankan dilezel
5 Lec'h kaer ma bugaleaj, ma bro gaer Breizh-Izel !

2. Keno dit, ma zi bihan, kuzhet barzh an draonienn,
Tachenn c'hlas war behini, bugel, e c'hoarienn;
Gwez ivin ker bodennek, en disheol a bere,
E-pad tomder an hañvoù, e kousken da greisteiz.

3. Keno ! keno ! mamm ha tad, breman n'esperit mui
E chomfe ho mab karet da harpañ ho kozhni,
Evit gounit doc'h bara, vel m'hoc'h eus graet dezhañ,
10 Al lezenn zo didruez, ho kuitaat a rankan.

4. Nag a wech, ma mamm dener, e renkfet-hu leñvañ,
Fa zeuy ma c'hi ankeniet en-dro doc'h da ruzañ;
15 Fa welfot, war an caled, ma skabellig c'houllo
Hag ar c'hevnik o steuñviñ ma fennbzh dero.

5. Keno ! bered ar barrez, douaroù benniget,
Pere a guzh ma c'herent gant ar salver galvet;
Da ouel an anaon klemmus, n'in mui war ho peziou
20 Da skuilhañ dour benniget mesket gant ma daeroù.

6. Keno ! ma muiañ karet, ma dousig koant Mari,
Ur blanedenn digar a zeu d'hon glac'hariñ;
Erusted ha levenez skedus zo tremenet
Vel en oabl ar goumoulenn gant an svel kaset.

7. Ne welin mui da legad ker lemm ha ker laouen
O virviñ gant plijadur, en ti pa erruen,
25 Da zornig gwenn ker mibin o treiñ ar c'harr en-dro,
Da vouezh flour mui ne glevin o kanañ va gwerzoù.

8. Fa oamp er c'hatekismoù, hon daou c'hoazh bugale,
30 Hor c'halonoù diskiant, e-kuzh, a 'n em gleve,
Dirak Gwerc'hez ar c'hroasent, nag a wech e touejomp
Na erruje birviken disparti etrezomp.

(*) Sl. p. 16.

9. Yaouank ha dibreder, siwazh, ne ouïemp ket
 Meg a bet c'hwerventez er vuhez zo hadet;
 35 Evidomp ne oa, neuze, lezennoù na roue,
 N'anvezemp met ul lezenn, hini ar garantez.
10. Keno, ma nes amezeg, Yannig ma gwir vignon,
 Kamalad ma c'hoarioù, ma breur dre ar galon,
 40 Piv a gemero breman lod e-barzh ma foanioù ?
 Piv a gomzo ganin-me deus ar gêr hag ar vro ?
11. Hebzon te yelo breman da'r parrezioù tostañ,
 Da bigosat al leurioù barzh el lazou dornañ;
 Hebzon te yel da c'hounit maout ar c'hourenadeg,
 Da sachañ war rubanoù e-barzh ar varc'hadeg.
- 45 12. Keno, ma c'hazeg velen, skañv evel un heizez,
 Mistr evel ul logodenn, jentil vel un oanez,
 Ne'z sentin ken, dindanon, gant an hast, o tripal,
 Ma daouarn mui ne stagint ar seizenn war da dal.
13. Keno ! ma c'hi kaezh, Mindu, ma leal kamalad,
 50 N'efomp ken, dre ar c'hlizhenn, da glask roudoù ar c'had;
 Ne glevin ken, er menez, da chilpadenn skiltrus,
 War ma dorn mui ne santin da deod karantezus.
14. A-benn un nebeut amzer, kalz a vignoned yen,
 Barzh er soudard divroet, hep mar, ne soñjfont ken,
 55 Mes da galon-te, Mindu, n'eo ket ken ankounezhuz,
 Pell e ri c'hoazh va c'hañvoù, gant da yezhoù klemmus.
15. Keno 'ta plijañurioù, leurioù nevez, predoù,
 Nezagogoù, nozvezhoù, foarioù ha pardonioù,
 60 Ebatoù ker birvidik, biniou sart ha sklinton,
 Ne drido mui va c'halon gant da sonioù lirezhin.
16. Keno kement a garan, keno da virviken !
 Pell oc'h a Vreizh me varvo, mantret gant an anken,
 Vel ur blantenn gizidik, evit ar vro krouet,
 A renk gweñviñ ha mervel, kerkent m'eo divroet.

Da'n aotrou Herry, e Kemperle,
 gwir Vreizhad a galon hag a yezh.

35

DISTRO AR SOUDARD E BREIZH
 (An devezh kentañ)

Da welet a ran adarre,
 Va bro garet, Menez Arre,
 Pell diouzhin poan hag en krez !
 5 Tridal a ran gant levnezh !

Gwelet a ran, pell en draonienn,
 Tour an iliz, er goumoulem;
 Ar maged, 'n ur droidellat,
 O tibradañ us ti ma zad.

10 Klevet a ran ar c'hloc'h sklinton,
 Ar vombard, ar biniou lirezhin,
 Un eured a zo dre ama,
 Jabadao ! ebat ! tra, la, la !

15 Deiz mat ! deiz mat ! kamaladed !
 Gwin leizh ar skùll ! kanomp, paotred !
 Eurvad deoc'h, priedoù nevez,
 Gant ur c'hruvilhad bugalez.

20 Ma mamm ! ma zad ! ma dous Mari !
 War ma c'halon ! ha start, ho-tri !
 C'hoarzhomp ! gouelomp ! vat ra gomelañ,
 Gouelañ, gant eureded ha joa !

25 Sellit ouzhin ! yac'h pesk, bepred !
 Kreiz an tan ruz, kreiz ar c'hleñved,
 C'hwil a viras, Gwerc'hez c'hlan Breizh,
 Ar soudard paour a zalc'h ho feiz.

E Rumengol, deiz ar pardon,
 M'ho trugarekaio, Itron !
 Ne ray seizh tro da'n aoter vras,
 O kerzhet war ma daoulin noazh.

30 Ma c'hi Mindu, perak yudal ?
 Ne zistroin ken da Vro-C'hall;
 Ni a raio c'hoazh tro ar c'hoad;
 Vit ma'z out kozh, da fri zo mat.

35 N'on ken soudard ! Mamm, ma chipenn,
 Paet eo ma dle da'l lezenn.
 Mari, tap krog er sizailhoù
 Deus da droc'hañ ma moustachoù.

C'hoarzhin a rez ! Ma ! keuz 'm eus de,
C'hwez ar poultr a zo c'hoazh gante;
Bet int skoulmet, bet int rouzet,
Hogen, gant den n'int bet krennet !

Tavomp war se; ur pok brema;
Feur an eured ? Perak ruziañ ?
Lâr 'ta da'm mamm, zo mamm dit-de,
'Bae ma da hini gant Doue.

An hanternoz ! Prim da'r gwele !
Warc'hoazh mintin, abred vo deiz,
Ni a yelo, holl a vandenn,
D'ober gweladenn penn-da-benn.

Redek a refomp ar pradou,
Ar parkier, ar brouskoadou,
Gwelet a vo an ebeulien,
Ar c'hezeg, ar gazeg velen.

Ar saout, al leueoù dizonet,
Ar c'hole brizh, an ejened,
Ha (resped da'n neb am selaou)
Al loen a zoroc'h en e graou.

Ma'm eus desket un tamm galleg
'M eus ket dizesket brezhoneg,

Ma'm eus ket ankouazhaet ma c'himiad,
Kernevad on ! Penn, kil ha troad.

Piv na gan ma c'himiad er vro ?
Ra blijo doc'h ma son distro.
O ! vit meuliñ hor Breizh karet,
Unanomp hor mouezhioù bepred.
X

DA'M C'HAMALAD A. BLJON
Doktor-Louzaouer e Kemperle.

Te a oar fritañ louzoù
Ouzh droyg-kof, remm ha pistigoù,
Me a ziduell, gant ur son,
An den gouliet a galon,
Me ra gouela, soñjal, c'hoarzhin!
Em giz, n'on-me ket medisin ?

MOUEZH AR C'HLEIER

Kinniget da Eostig Koad-an-Noz.

Eostig koant, er c'hoad uhel,
Te gan meuleudi Breizh-Izel,
Me gar ivez, ma bro Arvor.
Gant he sae vrug, he gouris vor.
Mindu a zo ur c'hi leal,
Hogen ne oar nemet harzal.

War don : Emgann an Dregont.

Bim ! baon ! me zo strobinseller;
Me oar petra gan ar c'hleier,
Selaouit holl o mouezh santel,
Ha sentit mat ouc'h o c'hantel.

Bim ! baon ! baon ! kloc'h an ofrenn-bred.
Lâret a ra : Hastet ! Hastet !
Kalz ne zegouezhont en iliz,
Nemet un hanter a'n ofis.

Darn ne reont nemet roc'hal,
Ha darn all (resped doc'h), strakal,
Trompilhat gant o div froenn,
Pe ribbulet o c'horzailhenn.

Ar baotred lemm, dindan o sav,
A lugern oc'h ar plac'hed vray,
Gant ur sell flemus, ar merc'hed
A lavar dezho : kendalc'het.

Yann Bitoch a glask, 'n e spered,
Penaos gennañ e vignoned,
Lakaat en e yalc'h ur bern kresk,
Dre ar burzhud eus ar pemp pesk.

Ar person moal zo borodus,
E brezegenn zo moredis,
Ar soubenn, hep mar, vo yenaet,
Hag ar patatez kaledet.

Ar c'haner kozh, Luk Totoro,
A vlej vel ur c'hole taro,
Emberr e walc'ho e gorzenn,
Fant a lardo c'hwek e groc'hen.

Bim ! baon ! un eured pinvidik !
Brall da'r c'hleier ! C'hwez da'r muzik !
Div yalc'h bonner zo 'n em baret.
Ki ha kazh a zo bazhyevet !

Furnez, gened ha koantiri,
 Ne lakont kaoter da virviñ,
 Ar madoù-se zo madoù paour !
 Azeulomp hepken al leue aour !
 Setu dimeziñ daou baour kaezh,
 Pilhoù, dmuilhoù, poan, dienez !
 Mann da fritañ ! med paourentez
 E-leiz pillig ar garantez !
 Ba ! chaaket a vo patatez !
 Lakaet hanter zour barzh el laezh !
 Doue a vev al loened mut,
 Truez en devo oc'h an dud !
 Bim ! baon ! baon ! ur vadeziant !
 Ar bugelig, ma feiz, zo koant.
 Hag oc'h e dad eo hañvel tre,
 Fri e baeron 'n deus koulskoude !
 Gant an holen kriz, ma aelig,
 Ez eo ruziet da vuzellig :
 Er vuhez, enkrez ha daeroù
 A gavi c'hoazh muioc'h c'hwero !
 Mar bevez kozh, war hor bern pri,
 Da ene c'hlan a vastari,
 Da galon lies vo roget
 Gant drez ha spern, dre hent ar bed !
 Bim ! baon ! brimbalomp a nenzh brec'h !
 Miket eo Pav-krog, ar c'hrug-sec'h;
 Ognon, kignon, a-zruilhadoù,
 Ken a strinko ur mor daeroù !
 Tad un tiad bras bugale
 A zo galvet dirak Doue;
 An holl a ouel gant wir c'hilac'har,
 Ar c'hi a yud war-lerc'h ar c'harr !
 Bim ! baon ! Petra na lêront ket
 E kement yezh zo dre ar bed ?
 Kouls ez eo din 'ta troc'hañ berr,
 Sart on ... vel un teuzer kleier !

I

An hent-houarn ! an hent-houarn !
 Bouzaret eo ma divskouarn,
 O klevet an dud o rakat
 Evel glazarded en ur prad !

5

Hent an ifern ! 'me Yann Gegin :
 Ijin ouzh ar spered malin !
 Deiz ar varn, siwazh, a zo tost,
 Pa'z a Iusifer da vestr-post !

10

Hent ar foeltr, 'me ur c'harretour :
 Barnet omp ganit d'evañ dour,
 Konduktored, postilhoned,
 Kement a vev ouzh strak ar foet !

15

Hent an diaoul, 'me an ostizez :
 Ret vo lonkañ ar yod hep laezh,
 Ne dremenno ken dre aman
 Met pilhaouerien ha chas klañv !

20

Hent milliget, 'me an aotrou :
 Te teus dallet ma frenestroù,
 Diskaret kraou ha marchosi,
 Lakaet an itron da sodif.

25

Hent ar gonnar, 'me Bipi Guer :
 Te teus graet din ur c'hoari gaer,
 Ma lakaet d'ober ul lev dro
 Vit darempred ma douaroù !

30

Hent ar mallozh, 'me un dostenn :
 Te teus skarzhet ma zi kempenn;
 Mevel, matezh, ma gwreg Janed,
 Skubet gant ar chiminoed !

II

Hent a walleur, 'me Ivonig :
 Eus toull ma dor welen Fantig;
 Ur menez trezomp zo bernet,
 Ur mignon tostoc'h 'deus kavet !

35

An hent-houarn, ouzomp ervat,
 En deus touzet meur a zañvad,
 Met lakaet 'n deus meur a laoueg
 Da c'hwezhañ 'n e groc'hen touseg.

Talet 'n deus aour e krabanou
N'o doa meudet met santimou,
Torchet daerou intañvezed,
Dilouedet merc'hed kozhviret.

Kement-se zo c'hoarielloù,
Hep dale welfot burzhudou,
Eurvad da'n hent, nerzh d'e sutell !
Ha pep seurt vad da Vreizh-Izel !

Goulenñ a refot, marteze,
Piv 'n deus fleutet ar son nevez ?
Ur C'hernevad, o c'hwezhañ start
Vit avelañ e gozh vombard.

Pet c'hoar henañ teus ma sonig ?
Kalz re, 'me ul leanezig,
Oc'hpenn tregont zo anezhe,
Unen zo koant... c'hoazh marteze !

DA'M MIGNON HA KENVREUR F.-M. AN UHEL

Kanet em eus gant kalz dudi
Da chimaqueuz Keralzi,
Na stouv ket brema da skouarn,
Ma kanin dit ma hent-houarn.

Roziou bet chomet diembann (Taldir, p. 84) :

Taran warnout, marc'h Lusifer,
A yud gant skrign ur chaseer,
Drailhet ec'h eus gant da garnou
Ar c'had hag ar paour kaezh Brifo.

Hent-houarn ! Da aerouant tan
Am c'haso war e askell vran
Pell bras, siwazh, a Vreizh-Izel,
En douar estren da vervel.

Met soñj am bo on gwir Breizhad,
Em c'havell hag en bez va zad.
Mar kanan c'hoazh, evn divroet,
En yezh Breizh me gano bepred.

AR FUBUENN
Lestrig a Vrezel

War don : Gwennili tremeniat

I

Displeg da askellig !
Ma Fubuenn goantik !
Mistr ha kempenn,
War gribell ar c'hoummen
Nij, herrus ha skañv
Vel ar gouelan.

Prim, prim, a denn askell,
Ma doug eta, pell, pell
Oc'h an douar
Ker karget a c'hlae'har,
Ker leun a boaniou kriz,
Hudur a bri.

War da c'horre, mor frank,
Ne weler ket a fank,
N'eus na drezenñ,
Linadenn na spernenn,
N'eus met an douar, an neñv,
Braster... Doue !

Peger brav eo bevañ !
Peger brav alanañ !
A-us heol splann,
Mor eonus dindan,
Gourdrouz skiltr an avel
Er wern uhel.

O peger stank e red
Ar gwad er gwazhied,
Hag er galon,
Dibled ha dispouron
A drid sart ha laouen
Gant ar wagenn.

Levenez ha didu !
Gwelet brav a bep tu
Ar peskig drant,
Al labousedig koant,
Lirzhin, o tarnijal,
Pe o vragal.

Barzh en cabl glan, al loar
Da noz, skedus, a bar;
Steredenn gaer,
Patromez ar sturier, —
Ave Maris Stella !
Mater Alma !

Alies e soñjer
En dousig koant, er gêr,
Er vamm, en tad,
Ha gant hir huanad,
An daeroù tomm ha flour
A ruilh en dour.

II
Un deiz, pa savo kruz
War-zu enez ar Saoz,
Dispak da flemma,
Dispak da flemmig lemm !
Gant herr, a darzh kalon,
Bec'h da'l Leon !!!

Pegen kaer eo mervel
Evidout, Breizh-Izel !
Kreiz an taran,
Ha kruzmol an emgann;
Ar mor glas evit bez
Gant gwalc'h Doue.

Displeg da askellig,
Ma Fubuenn goantik !
Mistr ha kempenn,
War gribell ar c'hoummen
Nij, herrus ha skañv,
Vel ar gouelan.

FANTIG AN DURKEZ, gwreg ar marichal : Sellit ! sellit ! ar brizh aotrou !
Penaos e lugern e votoù !
Ur ribod blevek war e benn,
Keit ha lost ur big e chupenn !

5 DISKAN : Kis ! kis ! ma c'hi, da'r brizh Breizhad !
Bec'h da gof-gar ar renead !

JANED WIN TOMM, amiegeez : E vlev zo rannet ha flourer,
E voustachoù ruz zo peget,
Stummet e-giz da higennoù
Evit pesketa kalonoù.

10 MARGOD HIRLANCENN, ostizez : Ur c'houriz glas en e gerc'henn
War e zaoulagad div werenn,
Ouzh e chadenn grizilhonoù,
War e grabanoù manegoù.

15 JAKETA FLEMM RUZ, formierez : Kaozeal a ra kraouennek,
Distagañ ra pezhioù gallek,
E dad a zo Monsieur mon père,
E vamm, ma plij, Madame ma mère !

20 AN ITRON K. L., skolerez : Betek al loudourenn he c'hoar,
A zo brema, Mamzell Viktoar !
Ma aotrou n'eo met un visil âne
Ha me, une fichue bazane !

25 METIG AR WIBER, kouezierez : E dad, ur c'hakouz, a lignez
A gign markenned a-zoare,
E vamm a rastell un hent bras
Gant he c'hrabanoù, fiez glas.

KATO FRI MINAOUED, gwreg ar c'here : E c'hoar, foeli ! a zo leanez
E leandi ar patatez;
Ha gwelst hon eus an aotrou,
E roched lous maez e vragoù.

30 LOUIZA MITOUIK, leanez : Ne salud person na kure,
Vel ur pagan e tou Doue,
Ne gred ket tamm da'n diaouloù,
Da'r bugel-noz na da'n teuzoù.

MADALEN RANTANPLAN, gwreg an tabouliner: Seizh vloaz eo bet soudard brudet,
War dour Malakov 'n deus kludet,
Ha panevet n'ouzon petra
E vije kabiten brema.

MARTINA BIM BAON, gwreg ar c'hloc'her : Ato ! soudard ! ur soudard kaer !
Soudard (resped doc'h an talier) !
Ar marmouz biskoazh 'n deus gwelet
Met tan ar gegin en oaled !

N'en deus gwelet enebourien
Met war zu gin ar vedalemm;
Ma 'n deus lazhet un enebour,
'N deus hañ beuzet gant un tenn dou

MIKAELEG BEG MEL, plac'h majorez : Mestrezed, a lavar, 'n deus bet,
Ken na ouie pelec'h lammet,
Ha ranket 'n deus skampañ dre laer
Pe vijent deut d'e heul da'r gêr.

JOENNIG AR C'HAVR, dañserez konnaret : Oc'h ar wombard ra ur sutell,
Oc'h ar sac'h biniou, ur porc'hell,
Dañserien ha dañserezed
A zo ur stroll saout pennfollet !

AN HOLL C'HOMEREZED (en ur vouezh) : Haro ! warnañ, prim ac'haleñ,
Kozh kemenerig, brouder c'hwen,
Kerzh da glask da grinoñinoù
Da strinkerez ha da louzoù,
Da strinkerez ha da louzoù !

Da Ber AR GOFFIC, Mouler e Gwengamp.

HIRVOUDOÙ AR CHASEER

Kinniget da'm mab Prosper, telegrafier.

War don gallek : La Saint-Hubert.

Gak e pep lec'h, ha gak bepred !
Seier goull ha min mouzhet,
Setu petra eo ar chase.
5 Ha keuz teus c'hoazh da'n didu-se ?
Tan ha kurun ! Iuduiñ vel kizhier !
Ni zo c'hoazh reut, sonn mat war hon elloù !
Met ne gav mui netra ar chaseer;
Petra dalfe bragal dre ar parkoù ?
10 N'on ket c'hoazh moal, ma barv n'eo ket louet !
Lies, velkent, en deus berved ma gwad
Pa selaouen mouezh skiltrus ar chas-red,
Hag an drompilh o tournial er c'hoad.
Gwelet em eus an tourc'h-gouez konnaret,
15 En em strinkañ dre greiz ar brouskoadoù,
Ar yourc'hig, mistr, gant ar spouren follet,
O tibradañ, uhel dreist ar bodoù.
Pelec'h int aet, — moc'h-gouez ha yourc'hed ?
An diwezhañ zo darev da vervel !
20 Ne chom outo mat kroc'hen direunet,
Hag eskern kras stag ouzh dor ur c'hastell !
Ar blev, ar pluñv, holl, siwazh, ez int boull,
Ouzh ar gedon, nend eus hogos hini,
Ar c'honikled a guzh barzh en o zoull,
25 Graet eo, pell zo, kañvoù ar c'hlujiri.
Gedon penn-gwenn — ha klujiri koefet,
Ar re-se c'hoazh zo stank er parkeier !
Paotred diskuzh, diwallit, mar keret,
Ar gedon-se a bak ar chaseer !
30 Ni hon eus bet amzer vat koulskoude :
Tennet, lazhet, karget leizh hor seier.
Tud yaouank kaezh, petra dapit aze ?
Logod, razhed, pintiged ha kizhier !
Grit evel don, skourrit ho fuzuilhoù,
Sant Huber kozh, hon tad hag hon faeron,
35 A zo mouzhet war e skaoñ en neñvoù,
D'en divouzhañ, kornomp a nerzh kalon !

AR PAOUR KAEZH LAZAR (*)
graet gan un den nevez-zistro ouzh ar bed all.

War don : Maout ar Gov ha maout ar Gall.

War ma feiz ! ma mignoned,
Divalav on bet gwasket.
Sofñjal a raen, en taol-ma
E wankjen lipat ma loa.

DISKAN : Tra, la, tra, la, tra, la, la ! (bis)

5 An ankoù, an dougnez kriz,
Evit ma stlejañ ganti,
E bro teñval ar gozed,
Kalz, kalz he deus c'hoariet.

10 Na velkent, ouzh he skilfoù,
'M eus sachet ma relegoù;
Met, pell, a vo kizellet
Warnon he fav milliget.

15 Ma divjod a zo melen
Evel ur c'hohz anguilhem,
Ma lagad hanter varo,
Trut on vel ur sqc'h tachou.

20 Ma choug a zo daoubleget,
Ma fri 'n deus un troatad hed,
Teuzet krak eo ma c'hof-gar,
Ha krenañ ra ma div c'har.

Evel ur paour mac'hagnet,
War un tammig bazh harpet,
Er parkoù en em stlejan
Vel ar c'hizhier da heoliañ.

25 Ret eo din krenn kuitaat
Kement seurt a gaven mat,
Hag un dra vrasoc'h, — oc'hpenn,
Karout pezh a gasaen.

(*) Sl. p. 6.

30 Karout a raen ar bevin,
Un tamm maout, ur c'har boñsin,
Bremen rankan, vel ur c'haezh
Lonkañ yod ha patatez.

35 Gant ur bannec'hig gwin mat
E verve gwechall ma gwad,
Bremen 'z an, pa'm eus sec'hed,
Da evañ gant ar pesked.

40 Ma c'horn gant e vogedenn
An lakae sart ha laouen,
Keno ma yalc'h varellet,
Ma c'horn ker brav bragezet !

45 A greiz kalon e karien
Ar biniou, an abadenn,
Met ar wech-man, hep bombard,
Em eus ranket lammout start !

Me gare, da'n daoulamm ruz,
Nijal gant ma c'haezg du;
Bremen vel ur velo'huedenn,
E kuzhan barzh ma c'hrogen.

50 Karout a raen mintin mat,
Er maezoù redek ar c'had,
Bremen ne ran ken chase
Nemet da c'hwen ma gwele !

DA ERWAN AN ANDOUAR
E GWERLISKIN.

A L L O U A R N B E S K

War don : Seiz Gwengamp.

Ul louarn kozh, breman zo pell,
A gollas e lost er brezel;
Setu Alanig ar bourdoù
Da brezeg enep al lostoù.

Troc'homp ! troc'homp hor strobelloù
Mat da skubañ fank an hentoù !
Traoù disklenk hag a sac'h en drez,
Ur c'hrög fonnus da'r chas, lies.

Hola ! 'me ur c'hamm, ma mignon,
C'hwi a gomz flour vel ur person,
Ya ! me grenno ma stal ... emberr.
Distroit aman ho talier !

Nag a bet louarn dilostet
A zispriñ ar vad n'o deus ket :
Kriomp warno, haro ! haro !
Ul louarn besk n'eo ket paotr brav.

Pipi 'n deus peurlipet e dra,
War-bouez e benn, e yud brema :
Ar re binvidik zo daonet !
Alanig, te zo dilostet !

An dud desket, 'me Yann al Leue,
A zo enoeus, war ma feiz.
Komzet din oc'h an azened !
Alanig, te zo dilostet !

Jakez zo bet tenner, gwechall,
Skeiñ a ra 'biou 'baec m'eo gourdall,
Ar poultr, 'mezañ, zo dinerzhet.
Alanig, te zo dilostet !

Klevit al lonteg, foeltr bouelloù,
Bae ma'z eo poazh, tor ha stripoù,
Ne veul mat an dour benniget.
Alanig, te zo dilostet.

Breman p'eo moal, Mark Irvinenn
A gri : Bennozh dit perukenn,
Ne'm eus mui na trouk na loened.
Alanig, te zo dilostet !

Ur bouc'h kozh, mokedet e fri,
A lavar 'n ur hmanadif :
N'eus ken koantiri na spered.
Alanig, te zo dilostet !

Ar merc'hed, gwechall, oa flourroc'h,
O daoulagad oa kalz lemmoc'h,
O c'hoarzpadenn leun a c'hened !
Alanig, te zo dilostet !

Ur vrizh leanez, ur skriñ beg,
A grozmol 'n he mizell varvek :
Ar baotred, holl zo sarpaneted.
Alanig, te zo dilostet !

Dilezit ar penterezoù,
Troit ho kein da'm ebatoù,
Fav Satan warnoc'h zo stignet.
Alanig, te zo dilostet !

Sellit, lern yaouank, en ho mesk,
C'hwi welo kalz a vreudeur besk;
Grit skouarn vouzar d'o c'homziou,
Ha na droc'hit hed ho lostoù !

DA JAKEZ KERWASDOUE,
KALON WIR HA EREC'H DIR.

PERRINAIG HAG HE FODAD LAEZH

War don : Petra zo nevez e kêr Is.

1.

Ferrinaig — ar plac'h lirzhin —
A gerzhe skeñv da Werliskin,
Ur podad laezh sonn war he fenn,
Diasezet war un dorchemn.

5

Lekaet he doa ur c'hoef gwenn-kann,
Botoù nevez ha loeroù moan,
He blev rannet, flouret giz kêr,
Evel div lipadenn onner.

10

Klour an deiz, hag an heol splann,
Ar strouezh karget a richan.
Brav eo bevañ, o ma Doue.
Ferrin oa ket he fenn gant se.

15

Klevit ar plac'h o krozmolat.
Ma laezh, hep mar, vo gwerzhet mat,
Teir douseenn uioù neuze brenin,
Dindan ma yer o lakain.

20

Me 'm bo tri c'hlodad yer munut
Gwaraet kloz 'barzh en o c'hlood;
Gwall lemm e vo fri Alanig
Ma na lez din gwerzh ur wizig.

25

Ma gwiz, pa vo bras, a voc'ho;
Savet ma moc'h, me o gwerzho;
Gant ar priz me 'm bo daou leuz kaer,
Marteze zoken, un onner.

30

Setu din laezh a-leizh ar pod,
Amann melen er vazh-ribod;
Ma yalc'h a bonnera bendez,
Me vo ur baborez neuze !
Pentet evel ur bennhêrez,
Ar faroded ray din al lez...

35

Pipi, ma c'hoant, vo ma fried,
Jabadao, neuze vo dañset !
Ober a ra ul lamm dañvad,
Patatra ! grilhet ar podad !
Keno uioù, moc'h, klodad, onner,
Ha keno, siwazh, Pipi gouer !

40

Ar pod a zo brizhilhonet,
Hag al laezh er bouldrenn skuilhet.
Ferrinaig a skuilh daeroù,
Ar c'hi a lip e muzelloù.

2.

45

Ferrinaig 'deus hunvreet,
Kreiz he hunvre eo dihunet.
Piv na hunvre ket er bed-ma ?
Ar furañ koulz hag ar sotañ.

50

Ar paour a hunvre er madoù,
Ar pinvidig en enorioù,
Ar c'hlañvour a hunvre yec'hed :
An ankoù o dihun abred.

DA'M MERC'H ZOE-PALMIRA.
PIV NA HUNVRE KET ER BED-MA ?

War don : Ar Baradoz.

1. E gwarez an domder,
E red ur wazhig aklaer,
Oa un oan dianket
O terrin e sec'hed.
5 Emberr e tegouezhas,
Dre wall, ivez da'r wash,
Ur bleiz treut ha garo,
Ar mac'her eus ar vro.
Ar bleiz oa ur vleizez,
10 War yun a zaou zevvezh,
Ur vamm a ranke bronnañ
Tri vleizig a'r frankañ.
Al loen kriz, gant konnar,
A skrign dent, a lavar :
15 Perak 'ta, preñv loudour,
E fankez din ma dour ?
Itron, 'me an oanig,
Me a zo ur c'haezhig,
Flijet d'ho meurded
20 Ma selaou, ma c'hlevet :
Evañ ran dour avat
Dindanoc'h, dek kammad,
Ha n'hellan kabouilhañ
Hoc'h evaj gant netra.
25 E gabouilhaat a rez !
A droc'h krenn ar vleizez,
Hag er bloaz tremenet,
Teus ouzhin droukkomzet !
Penaos em bije graet ?
30 Ma na oan c'hoazh fleutet;
War ma mamm o tenañ,
N'on ket krog en daou vloaz.
Ma n'eo ket te, da vreur voe !
Pennêr on (war ma feiz).
35 Un eo 'ta eus da dud;
Dañvadez, ki ha maout,
Gouenn milliget ha yud,
Ar perc'henn, ar paotr-saut,

40 C'hwi glask holl, ma maro :
M'en talvo dit hizio !
Sailhat war war an oan,
D'e gas da'r c'hoad da goan;
Ker en doe blejañ kreñv,
45 Taget doc'htu e voe.
2. Digarez ar c'hreñvañ
Zo bepred ar gwellañ,
Petra dal da bod pri
Oc'h kaoter 'n em stekiñ ?
50 3. Touzerien, tud touzet,
Lonkerien, tud lonket,
Maout dinerzh pe vleiz gouez,
Ar bed holl zo vel-se.
Ar bed all, a lêrer,
55 A vo da'n dud dister,
Da'r re baour a spered.
Nag a dud a vo salvet !
Digarez ar c'hreñvañ
Zo bepred ar gwellañ.

DA CHARLES A VRO-C'HALL
BARZH BREURISZH BREIZH.

A N D E N H A N T E R O A D H A G
H A G E Z I V V E S T R E Z

1. Ne heller ket bezañ bepred,
Bezañ bepred ha bezañ bet :
Homesh zo ul lezenn digar
A bado keit hag an douar.
- 5 2. Jakez zo bet, siwazh, n'eo mui,
Ur paotr frammet a izili,
Bremen eo daoubleget e chouç,
Louet e vlev, kramennet e c'houç,
10 Ar merc'hed a gare kenan,
Hi a rae chibouñoù dezhañ,
Hogen, eus e holl vestrezed,
Div hepken 'n deus gallet miret.
An div-man oa intañvezed,
15 Gwraged a don (krediñ hellet);
Unan outo zo bepred glas,
Majorez, velkent, a bell bras;
Eben oa un tammig merglet,
Hag un nebeudig dislivet,
20 Roud an oad a ouie kuzhat
Hag a zek vloaz 'n em yaouankeat.
3. An div-ma, en ur gaketa,
En ur c'hoarzhin, 'n ur c'hozezañ,
Adalek ar beure da'n noz,
A bente blev ar marmouz kozh.
25 An hini gozh a ziframme
En toullad blev du a chome,
Vit ma vije outi heñvel;
Eben da'r blev gwenn rae brezel.
Kement e rejont o c'hwennañ,
30 O tiluziañ, o tismantrañ,
Ma teu moal vel un irviném
Pe ur penn leue digroc'hen.
4. Pa weljont ar c'haezh er stad-se,
35 Ganto voe kaset da vale.
C'hoazh e rejont goap dioutañ,
Goude bezañ peilhet 'nesheñ.

- Jakez a lavare neuze :
Itronezed, bennozh Doue !
40 Digoret 'c'h eus ma daoulagad,
Sciant a brener da bep oad.
Ma'm bije kemeret, dre wall,
Unan ac'hanoc'h e oan dall,
Moarvat he dije ma c'hoefet
Goude bezañ ma direunet.
- 45 5. Pet kilheg pinous skamp da'r gêr ?
Pet dañvad touzet a weler ?
Eurus pa viront o c'hroc'hen,
O daoulagad hag o empenn !

DA J. BINET, KALLAG.
ITRONEZED, BENNOZH DOUE.

RAZH KÊR HA RAZH KOUER

War un ton anavezet.

1. Ur razh, aotrou pinvidik,
Eus a gêr Is genidik,
A bedas ur raziñg kouer
Da goañañ gantañ er gêr.
Ar c'houer, goude kalz neuzioù,
Soulerezh, skrapadennoù,
A yeas d'e heul timat,
Engorto ouc'h ur pred mat.
2. Souezhet eo, ar paour kaezh,
Pa zegouez barzh er palez :
E c'henoù, frank digoret,
E zcaoulagad dislonket,
Ne wel nemet aour o lintriñ,
Melezourioù o skediñ,
War an daol ur stal pladoù
Leun a bep seurt madigoù.
Digor frank e zivfroenn
Da rufañ o mogedenn,
Tremouilhat ra e c'henoù,
Ha lipat e vuzelloù.
Divadaouiñ ra, velkent,
Gant ar c'hwez vat; a merzh dent,
A greiz kalon 'n em laka
Da grignat ha da zrailhañ.
Ma feiz, 'me Yann ar Mazed,ou,
Un askell en e c'henoù,
Bezañ aotrou zo gwall gaer !
Me a ranko chom e kêr.
An diaoul gant ar panaz,
An irvin, ar patatez !
Hag oc'hpenn c'hoazh ma ranker
O chaokat er parkerier !
Lonkañ dour vel gleskered,
Honnezh n'eo c'hoari ebet !
Gwellañ gwin zo e kêr Is !
D'ho yec'hed, aotrou markiz !

3. Hogen, e kreiz ar staol-gwer
Voe klevet un drouz ponner,
Gant merc'h Gralon o c'hoarzjin,
Hi ha meur a vastokin.
Ha ma razhed da redek
Hep gallout torchañ o beg,
War o lerc'h chas konnaret,
Un targazh ha lakoned.
An daou gaezh a red, a red
Evel loened difelc'het,
Ha panevet un toull goz
Gant skubet gant an Ankoù.
4. E feiz ! 'me Gouer, dialan,
Ar foeltr ganez ha da goan !
Gwell eo din louzoù hep nec'h
Eget kig, e kêr, gant rec'h !
5. Nag a reuz, bugaligoù,
P'erru mestr an avaloù !
Nag a vec'h ! Pipi al laer,
Ma vez tapet c'hoazh emberr.

DA YANN-FRANSEZ AR MESTR,
Pe vo an cabl teñval pe gaer
Mignon feal e pep amzer.

MARGOD AR BIG

Ar plac'h faeus

War don : Petra zo nevez e Kêr Is.

1.
 Anaout a rit ? Piv na ra ket
 Margod ar Big, a Gêr-Biged,
 Ur wrac'hig kromm ha barvegez,
 Vel ma vi-te, Fant skrignerez.
 Honnezh zo bet ur bompinnenn,
 Ur plac'h a dan, mistr ha kempenn,
 Lemm a spered, lemm a lagad,
 Ha pemhêrez dreist ar marc'had.
 Faeus a yoa, ha faeus bras !
 Mar kemeran, 'mezi, ur gwaz,
 E rank kaout nerzh ha koantiri,
 Teod ur c'hloareg, stumm ur Pipi,
 Ur galon domm hep botoù berr,
 Reizh ha sentus e pep amzer;
 A ouenn vat a renko bezañ,
 Gant un tamm brav a besdra.
 Kement ti vat rankje kavet,
 Ti fall ebet pe netra c'hraet,
 Un den vel n'eus, na vo biken,
 Ael da hunvre, Madalen !
2.
 Tostaat a ra paotred farod
 D'ober askellig da Vargod.
 Tud a zanvez, koant, stummet mat,
 Ar plac'h ne gar hini d'he grad.
 Ato ! me dimañ da'r seurt-se !
 Trelatet int, sot-nay, ma feiz !
 Sell Yann, gant e fri minaoued;
 Fañch, an daoulagad dilavet;
 Loeizig, ul logodenn vihan;
 Job, ur geuneudenn dreut ha moan;
 Heman plademek vel ul leue,
 Henhont ker feuls hag ur c'hole !
3.
 Pa oant skuizh oc'h huanadifi,
 Int skampet, hini ha hini;

- 35
 Neuze tosta paotred teuskoc'h;
 Daou intañv louet, ur seller moc'h...
 Margod a ziroll da c'hoarzhin
 Gant neuziou krog dirak o min.
 Ne lakin ket, ac'hann da bell,
 Ne lakin ket, ac'hann da bell,
 Spilhon da goef, santez Katell.
4.
 An oad a zeu, keno gened !
 He blev zo gris, he beg ridet,
 N'heller, siwazh, nevezifi
 Beg ur plac'h kozh vel tañ un ti.
 Ar melezour, ar c'hloc'h, bemdez,
 A lavar dêi : Dimez, dimez !
 Ar big a grog en he skouarn.
 O ! mil bennozh da'n hent-houarn !
 Kavet he deus ur chemino
 Tort, jilgamm, luch ha divalav,
 Ul lonteg, paour evel ur razh,
 En em ginnig a rankas c'hoazh.
5.
 Penaos e kavet ar gentel,
 Merc'hed breuriezha santez Katell ?
 Ha c'hwi gwrages cheminoed,
 Feus ket a geuz da'r Vretoned ?

DA'M MIGNON VIKTOR ERESOLLES,
 E KOMERID.

AN DAOU GLASKER - BARA
HAG AR GRAONENN

1. Un devezh, daou valeer,
Paotred diskuizh ha seder,
Dantet evel daou gi-red,
Digor o c'halon abred,
Etrezek ar gêr dostañ
A gerzh skeñv, en ur ganañ.
2. O-daou oant mignoned vras,
Pa weljont, rez an hent bras,
Ur graonenn c'hwek ha melen,
O koushañ oc'h ar wezem.
Setu an daou baotr doc'htu
A red dezhi da'n daoulamm ruz.
Kenavo, mignonisaj !
Savet heskin ha ragach
Me 'm eus gwelet da gentañ !
Me zo krog enni brema !
Da flip ! da flap ! bazhadou.
Gwad a strink eus ar frioù.
Kreiz ar gamm, 'n aotrou barner
A zispak gant e c'hrefier.
Hola, petra zo paotred ?
Perak oc'h ken konnaret ?
Peoc'h doc'h-ma da'r o'hoari pav !
Ha komzomp evel tud vras.
Vel-henn aotrou, ma ar bed !
Nann, nann, n'e selaouit ket !
Gaou a lêrez, kozh targazh !
Ha te, treitour, min Yuzaz !
Peoc'h ! A-walc'h a sklerijenn !
Roit din prim ar graonenn.
Ar barner brav he debras,
Hag oc'h o fri he chaokas.
Mat eo, 'mezañ, ar vouedenn;
Setu deoc'h pep a grogen.
Tud a bluenn, tud a sae,
Ni vev oc'h ho fallentez !

3.

Selaouit mat, genaouerien,
Tud tagnous, heskinerien,
Neb a c'hounez ar breudou
A zeu, lies, divragoù;
Ar paour kaezh a goll, siwazh,
A zistro da'r gêr en noazh.

40

DA J.P.M. AR SKOURR, BARZH HUMENGOL.

TUD A BLJENN, TUD A SAE,
NI VEV OC'H HO FALLENTÉZ.

AR WRAC'H KOZH HAG AN DIV
VATEZH

1.

Ur wrac'h a oa, e Montroulez,
 Ur wrac'h varvek, ur gozh kazhez,
 Hir he dent, lemm he ivinoù,
 Trelatet gant diaoul ar skoedoù.
 Div vatezh yaouank oa ganti,
 Div blac'hig skañv a izili,
 Nezerazed a'r re gaerañ,
 Kouskerazed eus ar gwashañ.
 An hini gozh n'he doa ken pred,
 Nemet da sevel gwall abred;
 Kilheg an ti, orged, e-leizh,
 A drompilhe da c'houlou deiz :
 Kerkent, skañv evel un heizez,
 An diaoulez a lamm er-maez,
 Ur vrozh lous, peg eus he zalier,
 En he zreid, ur c'hozh botoù ler,
 Ur pennad rousin zo ganti;
 Handa veskañ, ha da c'hoari,
 Stropañ bankoù ha kadarioù,
 Skiffvier, armelioù, doradoù.
 Heñvel eus ur vuoc'h pennfollet,
 E red da wele ar merc'hed;
 Ha d'h gervel, ha d'o hejañ :
 Er-maez, div c'hagn !, prim er-maez 'ta !
 An div blac'h, souchet 'n o zoullig,
 A roc'h hag a gousk maro mik.
 Ret mat eo, siwazh, dimnif,
 Kaer zo fringal, en em reudiñ.
 Fant a zamzigor ul legad,
 Soaz en em grat, 'n ur vazsilhat;
 O-div e krosont, konnaret :
 Mervel a ri, kilheg daonet !
 Mervel eure an dihuner,
 Mouget ganto an trompilher.
 Allas, ne wella ket o stad :
 Ne ra, en enep, met gwashaat.

5

10

15

20

25

30

35


40

2.

45

Ar vleizez kriz, a-c'houdevezh,
 Ne serr laged na ne bacuez,
 Da bep koulz noz int trubuilhet.
 Kement-se o deus gounezet.
 Kalz, kalz en em zishuala,
 En em luzi wazh peuliesañ.
 Ma hoc'h eus poan, gwaskit warnañ,
 Lezit ar c'hilheg da ganañ.
 Paol gozh zo patr lemm, a lérer,
 Koulskoude eo 'n em vourdet kaer,
 O klask eeunañ he gar d'e vamm,
 He zorret en deus en daco damm.

DA J.V. AN ANDOUAR ER C'HOZH-VARC'HAD.



1. Ur miliner, e vab henañ,
 (Daou c'henaoueg a'r re gwashañ),
 A lakaas un deiz en o fenn
 Mont da foar Vre gant o azen.
 5 Vit en mirout diskuizh ha sart,
 E stagjont e bevar droad start,
 Vel ma welit er marc'hadou
 Ar c'higer oc'h eren al leusou.
 Tremenet ar stag ur grenenn,
 10 Krog an daou sod e pep a benn,
 Vel m'hoc'h eus gwelet a-wechoù
 Er pardon dougen relegoù.
 Ar c'hentañ hini o gwelas
 A greiz e galon a c'hoarzhaz.
 15 — Homan zo ur fars a'r goantañ !
 Al loen n'eo ket an azenañ !
 Ar miliner, un tamm toutek,
 A zistag e loen skouarnek,
 Ar mab a bign war e c'horre,
 20 Dia ! hu ! hag a-raok adarre.
 Tri Normand en em gav ganto.
 — Tra vrav, 'me unan anezho,
 Lezel da dad da veskañ pri !
 Da'n traoñ 'ta, prim ! Diskenn a ri ?
 25 — Graet a vo d'ho kiz, Aotrounez,
 Diskenn, mab, me ya war c'horre.
 Teir flac'h neuze a dremenaz,
 N'ouzon pehini a lâras :
 — An hent zo lous, ar bale start,
 30 Skuizh bras ez out, paour kezh krennard !
 Dieg kozh, brav eo dit azez,
 Digor da c'henoù vel ul leue !
 — Kerzh gant da hent, boroderez,
 Ha serr da veg lous ma hallez !
 35 Da'm oad nend eus ken a leueoù,
 Ejened int, pe goleoù !
 An tad a soñj, velkent, goude :
 — Ar c'hagn a gomz gant gwirionez,

Ma mab zo faezh, se a weler.
 40 Deus aman, paotr, war an talier !
 Ur pennad larkoc'h, ur rumm all
 Em em laka d'o c'haketal :
 O ! E ! Sell'ta daou varmouz kaer,
 Kluder war un tammig gwiber !
 45 Al loenig paour zo el langis;
 Reudiñ ranko ! De profundis !
 An daou babacour 'deus soñj, hep mar,
 Da werzhañ e groc'hen er foar !
 Stardig eo, 'me ar miliner,
 50 Malañ da c'hoant Paol, da c'hoant Per,
 Klaskomp koulskoude an ijin.
 I da ziskenn diwar Vartin, (anv an azen)
 Laosket, a-raok, an aneval
 Evel ma karje da fringal.
 55 — Giz vrav ! a hop un tremeniad,
 Ar perc'henn a zo war e droad,
 Hag an azen, vel un aotrou,
 A gerzh disamm dre an hentoù :
 Tri azen gaer en ur bagad !
 60 — Ya, azen on, eme an tad,
 Un azen brish, un azen foll,
 O klask ober da c'hiz an holl ;
 Me a raio da'm penn, bepred,
 Pe vin meulet, pe damallet.
 65 2. Bez damantus, souret, seder,
 Sot nay, fur bras, pizh, dismantreer ;
 Bourc'hiz, aotrou, soudard, beleg,
 Ennout e vo kavet abeg.
 Sent diouzhin hag e ri mat,
 70 Serr da skouarn, serr da lagad,
 Lez an dud sot da gaozeal
 Hag ar chas tagnous da harzal.

DA STEFAN LAGARDE, E LOKOURNAN.
 LEZ AN DUD SOT DA GAOZEAL
 HAG AR CHAS TAGNOUS DA HARZAL.

A N D A O U V I G N O N

1.

E Breizh-Izel, p'el lec'h all,
 Daou wir vignon voe gwechall.
 En hevelep kêr savet,
 O faskoù ' doa graet kevret,
 Tennet da'r sord heñvel deiz,
 Pep tra oa boutin gante.
 N'ouzon o ano, ma feiz !
 Uan Yann, Fañch egile.
 Yam, un nozvezh, a sav krenn,
 Ha strafuilhet bras e benn;
 Redek a ra, diskabell,
 Da di e vignon fidel.
 Hanter noz a oa neuze,
 Kousket an holl a zoare.
 A nerzh e vrec'h, Yann a sko
 Ken a spont kizhier ar vro.
 Fañch a lamm eus e wela,
 Dihunet kreiz un hunvre,
 Eus e vignon e c'houlem
 Perak eo ker diskempenn :
 Kollet peus e c'hoari flu ?
 Ma yalc'h a zo dit, doc'htu !
 Bet az teus kros gant ur re ?
 Setu ma brec'h, ma c'hleze !
 N'eus ger, Fañch, a gement-se,
 Mettme'm eus bet un hunvre :
 Da welet raen, dislivet,
 Koazhet, kastiz, diflaket,
 Gant spont on redet raktal
 Da'z kwelout, mignon leal.
 Fini oa gwellañ mignon ?
 Fini oa gwellañ kalon ?
 Kaerañ tra ur mignon mat !
 Lenn a ra 'n ho taoulagad,
 Hoc'h ezhomm a ziarbenn
 Vit espern deoc'h ar goulenn.
 Na n'int ket stank e nep bro,
 Kollet ar moul a bell zo,

2.

40

45

Ar vignoned, peurvuiañ,
 Ne geront nemet ho tra.
 Stank an ano a vignon,
 Boull an hini zo gwirion.
 Fad zo laezh gant ar vuoc'h
 Ez int stouet dirazoc'h :
 Ober reont chiboudoù
 Da'r c'hi, da'r c'hazh, da'l leueoù,
 Mar teu da'r vuoc'h dilaezhañ,
 Kenavo, mignon, ha skañv !

DA T.V.M. BILLETTE, E GWERLISKIN.
 KAERAÑ TRA EO UR MIGNON MAT !

AR C'HOG-RADEN HAG AR
VERIENENN

1. Pad an dommer, ar c'hog-raden
A gane nerzh e gorzailhenn;
N'en doa preder nemet bregal
Boueta c'hwek, heolif ha tumpal.
Ken a venne al loenig kaezh,
E pedje 'n hañv hed e vuhez,
E parje an heol benniget
Hag e vleuñvje ar prad bepred.
Na daolit ket ar maen gantañ,
An den zo dievezh veltañ;
Pad m'eo yaouank, yac'h ha laouen,
Piv wel erru ar gozhi yen ?
Setu deuet ar goañv kris,
Gant dent Genver dindan e fri,
An avel a groz gant konnar,
Ar glav a zilav an douar.
Loenig Doue, ne ganez mui;
Krenañ ra da holl izilli,
Krenañ gant naon ha paourentez,
Ne'z teus met un aezhenn vuhez !
2. Mont a ra, mantret a enkrez,
Da di e nes amezeged,
Ur verienenn flour vel ur goz,
Ar binvidikañ eus ar vro.
Yec'hed doc'h-hu, ma itron vañ !
(Ar bevien gaezh zo dereat)
En anv Doue, ma sikouret,
Ne'm eus ken, er gêr, fulem voed.
Prestit din, pad pemp pe c'hwec'h miz,
Ur rennad kerc'h, un tammig gwinih,
Me zaskoro (feiz kog-raden),
Greun evit greun, ha kalz oc'hpenn.
Ar merien, war a leverer,
Da brestañ, da reiñ, n'int ket kaer.
Gant ur beg rok : Petra, 'mezi,
Hoc'h eus-hu graet e-lec'h medif ?

- Me gane lirzhin vit an holl
A darzh an deiz betek kuzh-heol.
C'hwil a gane ! o ! mat a-walc'h,
Dañsit breman, dañsit ho kwalc'h !
- 40
3. Fals pinvidig, kozh verienenn,
Zinac'h d'e vreur an aluzen,
Te judo en tan gant konnar :
Ul lommig dour, Lazar ! Lazar !
45 N'omp ket merien, ni tud Arvor !
Da'r paour eo digor frank hon dor;
Bepred e kav gwarez ha boued,
Ur skabell e korn an oaled.

DA'M C'HENVREUR EMIL GRIMAUD
EN NAONED.

DA ZIWEZHANN

Da gimidiñ, holl lennerien,
 Kanerezed ha kanerien,
 E lavarin, e berr gomziou,
 Pelec'h emma ma faziou :
 5 Da gentañ e lavarin krenn
 Ez eo bras meurbet ma anken,
 Pa ne'm eus lavaret abred
 Ez eo ar Rubuenn kinniget
 Da'n Aotrou Kermarker, den mat,
 10 Da'r brezhoneg ken hegarat.
 Da'n eil e lârin, war bouez penn
 Em eus tapet eus La Fontaine
 Abeg kentañ da'r fablennou
 Zo em levr e kanaouennou.
 15 Koustus eo din el lavaret,
 Ha pell bras ez on bet nec'het
 O klask an tu da ziskleriañ
 Ma faziou ar re vrasañ;
 Gwall vezeg on, pa lavaran,
 20 Distac'l ouzhoc'h a c'houlseman... !

I V
O B E R O Û

g o u d e
1866

54

D I O U G A N

Ar barzhed kozh a zo maro,
 Re nevez zo savet er vro,
 Sevel a ray re all goude
 Keit ma paro an heol en neñv.
 5 Q yezh va Breizh-Izel karet,
 Unan ar re gaerañ a'r bed,
 Ra vi da viken kendalc'het !

55

D A ' M M I G N O N K O Z H I . P . M . A R S K O U R

Barzh Rumengol tad ar barzhed,
 Alies din 'c'h eus lavaret :
 Deus 'ta, dihin, paotr lemm Kernev,
 Dispak deomp ur sonig nevez.
 5 Ur son ebatus ha lirzhin
 Da lakaat Breizhiz da c'hoarzhin;
 Da lakaat Breizhiz da dridañ
 Da fringal ha da c'hwirinañ.
 Nann ! Paotr Kernev ne rimo ken,
 10 Tougnat ez eo beg e bluenn,
 En e spered n'eus mui a dan,
 En e skevent n'eus mui alan.
 E sac'h biniou a zo roget,
 E gozh vombard a zo faoutet,
 15 N'eo ket, siwazh, mouzhat a ra
 E sutell zo aet da netra.
 Barzhed yaouank, a bep avel,
 A gan brema dre Vreizh-Izel
 Pa richan 'n eostig er vodenn,
 20 Teo'h ha kloz da veg, kozh kaouenn !

Mallozh rus da'r Prusianed
 Mallozh da'l laeron konnaret !
 Torr e benn ! Trec'hiñ pe vervel !
 A-raok, bugale Breizh-Izel !
 A-raok ! Ur gwir Vreizhad biskoazh
 Dirak ur c'hleze ne dec'has,
 Ar maro kent an dizenor
 A vezo bepred ger Arvor !

Ra vezit deut mat, kenvreudeur,
 Barzhed helavar a Vreizh-Veur,
 P'hoc'h eus prizet treuziñ ar mor,
 Vit stardañ dorn breudeur Arvor !

Stignet kerdien ho teleennoù
 Da ganañ demp kanaouennoù,
 Kanaouennoù kaer ar varzhed,
 Savet en amzer dremenet.

Lavaret demp hiziv penaos,
 Penaos, siwazh, en oadoù kozh,
 Eo c'hoarvezet an disparti
 Etre hor breudeur ker ha ni.

Kanit diwar-benn an Drouized
 En o dorn ar fals alaouret,
 O baro hir, o saeoù gwenn,
 O prezeg war lein an daolvaen.

Kanit ar bobl nerzhus meurbet,
 An dud galloudus 'deus bernet
 Ar c'herreg ponner bern-war-vern,
 Evit beziañ o fenntiern;

O deus savet taolioù, peulioù
 Sonn, goude kalz a gantvedoù
 Sonn hag o lavaret bepred :
 Bro Breizh-Izel ne varvo ket !

Kanit ivez a vouezh uhel
 An emgann ruz hag ar brezel,
 Ar roue taer, ar roue gwir
 Arzhur hag e gleze meur dir,

Pignet war e varc'h glas sternet,
 P'en em strinke ken konnaret
 E kreiz stroll an enebourien
 Hag o flastre evel merien.

Kanit Riwal an diouganer,
 Riwal ar barzh hag ar goaper,
 War ur skubellenn a-c'haolriad
 O nijal war-zu ar sabad.

40 En-dro dezhañ stroll an diaoulou
O yudal euzhus er maeziou,
Ar c'horred du war an dorgenn,
Pennfollet gent an abadem.

An hoc'bed-vor o scroc'hañ,
Ar vorgezeg o c'hwirinañ
War grib eonus ar gwagennoù
Pa ziroll stourm ha kurunoù;

45 Ar vorverc'h koant ken treitourez,
Hanter pesk ha hanter vaouez,
O kanañ flour da'r verdeidi
Da lakaat breviñ o listri.

50 Kanit bro an Hiberni glas,
Bro ar verzherien, ar sent bras :
Eflam, Ronan, Kae ha Sane,
Sent leun a feiz, a garantez,

55 A ziskemmas en Breizh-Izel,
Vit prezeg demp an aviel,
A savas war gern ar peulvaen
Kroazoù skeudenmus mab an den,

60 Hag hon deskas da azeuliñ
Ar mab ganet er marchosi,
Ni tud direizh n'hon doa biskoazh
Stouet hor penn dirak nep gwaz.

Tridal a ra hor c'halonoù
O klevet yezh hor gourdaioù,
Hag an delemm o sinif c'hwek
En douar santel Sant-Erieg.

65 Setu va dorn, kenvroidi !
Ha teir youc'hadenn 'vit Cymru !
Ya ! daoust da'n amzer, daoust da'r mor,
Breur eo Cymro da vab Arvor !

